



Kamp Etrekeltiek
Ar Vrezhonegerion

Rostrenen (29 gouere - 14 eost 1965)

Prezegennoù gant

ERWAN GWEGEN GOULVEN

PENNAOD ABENNEZ OLIER LOYER

PREDER

Kaier 71

Mae 1965

Kamp Etrekeltiek **Ar Vrezhonegerion**

Rostrenen (29 gouere - 14 eost 1965)

P r e z e g e n n o ù g a n t

ERWAN GWEGEN GOULVEN

PENNAOD ABENNEZ OLIER LOYER

PREDER

Kaier 71

Mae 1965

K I N N I G

"Diorro bleunioù da spered, ha ganto e vo c'hwekaet ar bed"
a lavar Japaniz.

Ar bed a zo bras, Breizh a zo bihan, ha koulskoude,
evel ma tegas ar vleunienn vihanaf koantiz he liv tener
d'ur boked bras, e c'hell hor bro degas perzh he sevenadur
d'ar bed a-bezh.

Lavarout kement-se n'eo ket bezañ lore'hus. Kredif a
reomp en ur sevenadur hollek ha ne c'hell bezañ klok nemet
gant kenlodenñ bep gouenn. Kredif a reomp en ur gengarantez
kreñv, a zouj kement bro - pegen distar beznak e vefe e-keñver
niver hec'h annezidi, - kement menoz, kement ene, a glask ar
frankiz, kempouez ar bed.

Ne ro ket ar frankiz an eürusted, pell ao'hane, met
reñf a ra ul levenez bann a zo a-us da bep tra all.

Ne c'houlennomp ket an eürusted. Al levenez an hini eo
a glaskomp. Evit he zizhout eo ret stummañ ar speredoù. Setu
aze hor pal e Kamp ar Vrezhonegerion. Bodañ brezhonegerion
evit ober anezho gwir Vretoned emskiantek, digor da holl gud-
ennoù ar bed dre hanterouriezh ur yezh paour dec'h hag o
pividikaat a zeiz da zeiz. N eus nemet derc'hel soñj eus ar
c'hentelioù hag ar prezegennoù displeget en hor c'hampoù evit
kompren emañ war an hent mat.

Kavet e vo amañ da heul, roll ar prezegennoù roet e
kamp Rostrenen. Meur a hini a denn da Vreizh, reoù all da
draoù disheñvel.

© K.E.A.V. evit an holl brezegannoù, war un dro gant hec'h
aozer evit pep hini anezho, eleze : Y.GUEGUEN, G.PINAULT,
G.LE MENTEC, O.LOYER, 1965.

El levrenn-mañ e vo kavet testenn pemp anezho : Danevellin a ra Erwan GWEGEN petra eo al lennegezh evitañ : "kement tra a vez skrivet diwar-benn an den hag e drivliadoù" ha pal ar skrivagner : "enaouiñ ha froumañ". Goulven PENNAOD mestr war ar yezhoniezh a ya war gil en amzer evit prouñ n'o devo hon diskennidi er bloaz 3000, kensonenn ebet, kouls lavaret, da zistagañ. O treuziñ ar morioù e reomp anaoudegezh gant Simon Bolivar, "al Libertador", skeudennacuet-kaer gant ABENNEZ, hag hemañ ivez a zesk deomp an Ardamezouriezh, arz nobl hon tiegezhioù hag hol lec'hioù hengounel. Olivier LOYER en e studiadenn c'houiziekl a-zivout ar Gristeniezh Keltiek a ro da c'houzout ar stourm a renas ar Gelted evit mirout o frankiz relijiel... ha diskoulm a ra evidomp kevrin imramoù hor sent kozh o tont da Vreizh war bigi mein.

Danvezioù liesseurt, evel ma weler, studiet a-ratozh-kaer evit reiñ da selaouerion Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, un tañva eus an deskadurezh holllek.

Pep striv nevez graet en hor yezh a zo ur c'hammed gounezet war hon digenvezded e-keñver ar pobloù all. Saly ma kresko niverus ha frondus bleunioù hor spered, en doare ma vo hor bro kenlodek e c'hwekadur ar bed !

Vefa de Bellaing
8.12.1965

Gwener 30 Gouhere 1965
DISPAC'H IWERZHON, gant Yeun GOURVEZ

Sadorn 31 Gouhere 1965
* A-ZIVOUT AL LENNEGEZH, gant Erwan GWEGEN

Lun 2 Eost 1965
PENADS E VOE SAVET "AN AVEL", gant Youenn OLIER

Meurzh 3 Eost 1965
* GWANAOUR AR C'HENSONENNOU E BREZHONEG, gant Goulven PENNAOD

Merc'her 4 Eost 1965
VA BEAJ EN IWERZHON, gant Fañch SOUFFES-DESPRE
KORN-BRO PONT'N ABAD, gant KERLANN

Yaou 5 Eost 1965
STROLLAD AN DESKADUREZH EIL DEREZ, gant ABANNA

Gwener 6 Eost
AL LAVAR REIZH, gant Jakez KONAN
* SIMON BOLIVAR al "Libertador", gant ABENNEZ

Sadorn 7 Eost 1965
* WAR HENTOU AN ARDAMEZOURIEZH, gant ABENNEZ

Sul 8 Eost 1965
KORGANDU GIZ KEMBRE, gant Per EVEN

Lun 9 Eost 1965
GIZIOU GWECHALL E BRO-DREGER, gant Y. AN DRED

Meurzh 10 Eost 1965
KREDENNOU DIWAR-BENN AR GURUN, gant Gwennole AR MENN

Merc'her 11 Eost 1965
KORN-BRO PONT'N ABAD (kendaic'h), gant KERLANN

Yaou 12 Eost 1965
IMPLIJ AR VERB BEZAÑ, gant Maodez GLANNDOUR

Gwener 13 Eost 1965
AN EMSAV EN 20vet KANTVED, gant R. DELAPORTE
* AR GRISTENIEZH KELTIEK, gant Olivier LOYER

Sadorn 31 Gouheze 1965

A - Z I V O U T A L L E N N E G E Z H

g a n t

E r w a n G w e g e n

Ve dezo n'eo ket diluziañ kement kudenn a saver e sigur al lennegezh, na zoken ober meneg eus ar pep brassañ; e sell emañ hepken da glask termenañ unan bennak ha kinnig un deorienn a c'hallfe talvezout da ziskleriañ traoù zo.

Petra eo al lennegezh ? Diwar walout e ve aes a-walc'h kinnig un termen-
adur diazezet war a zo anat d'an hini n'a ket da glask pemp troad d'ar maout.
Al lennegezh petra eo nemet pezh a vez skrivet e sell da vout lennet gant
plijadur ? Perak avat a klaser reiñ ar blijadur-se, ha perak e kaver plijadur
gant se, aze emañ an dalc'h. A-hend-all e kav ar pismiger da abegiñ diouzhtu :
an notenn-implij peget war ar voest boued-mir, lennet gant plijadur gant ar
gegineerz, daoust ha lennegezh e ve ? Ar zentañ-kont penn-bloaz kaset gant
ar banker d'e genlodeien da reiñ dezho da c'houzout o lod e bukad ar bloaz
a vez lennet gant plijadur; daoust hag e ve lennegezh ? An arbennigour a lenn
gant dudi an danevelled eus un arnodenn fizikel; daoust ha lennegezh e ve ?
Ur pennad kelaouerezh en ur gazetenn, daoust ha lennegezh e ve ? An neb a oar
petra eo na ray nemet ur c'hruz d'e skoaz ouzh an atere-se, diot a-walc'h
gouez dezhañ. Anzav a ray koulskoude e c'hall bezañ gant an testonnoù-se
perzhioù, ha zoken un daioni, lennegal : resisted, lakomp, barrentaz, mistrdec,

erwan gwegen

faltazi, meurdez, zoken. Perak ne vije ket ? Ha neuze daoust hag e vije e kementad ar perzhioù-se, en dreistalezh anezho, en dalvoudegezh denel pe gevredigezhel anezho, ez em gavje al lennegezh ? Anat eo ez eus oburennoù hep talvoudegezh ebet, na denel na kevredigezhel, hag a ra stad a vezañ lennegezh, peogwir ez eo amboez an oberour o sevel diouzh se.

Pezh a zo skrivet a c'heller koulskoude rannañ e daou rummad : pezh a zo skrivet da ditouriñ, ha pezh a zo skrivet da eztennañ testenioù a blijadur. Ar rummad kentañ a zo gant an holl destennoù a heller rankañ ennañ un hevelep doare : o fal zo reiñ da c'houzout traoù spis, termenet, hag a zo dezho un arver, pe war an taol, pe da c'houde; un ober zo da zont diwarno ma vozo tennet gonid eus ar gentel o davo degaset. Arveridik int.

Al lennegezh n'eo ket arveridik. N'emañ ket he c'hefridi a ziavaez diouti; he c'hefridi zo anni hac'h-unan. Pa vez bet lennet, eztennet pe get ganti an testenioù a blijadur zo he fal anzavet, ez eo sevenet pe c'hwitet. Na glask ket al lennegezh eta, mont d'an arbennigour, nemet d'an holl, hag e rank he divoud bezañ degemeradus d'an holl. Diwar skiant-prenet e c'houzer n'eus netra dedennus evit an holl nemet o skeudenn, ha tresoù pep hini e skeudenn an holl. Sed perak n'eus meneg e l lennegezh nemet eus tud, eus o doareoù, o amdro hag o darompredoù gantañ, eus o zrivliadoù e darventazioù ar vuhez, e berr eus tonkadur mab-den. Ar pep lennegezh, zoken, diarver-idikañ, ar varzhoniezh, n'eus meneg enni met eus an oberour, o levneziou, e boanid, e fromadennoù a bep seurt. Diwar se e c'hellomp savelañ ez eo lennegezh kement a zo skrivet a-zivout an den hag o drivliadoù an un doare plijus. Hag emañ e rankomp c'hoaszh resisaat; bez' ez eus danevelloù mentrus, kel enno nemet a reuzeudigezh, a c'hlac'har, a bec'hadoù euzhus, a zacroù hag a varv; n'eur ket evit lavarout ez int plijus, ha padal, diwar o lenn, e sav en den fromadoù kreñv, hag ar vourrusted da vezañ gouest d'an drivlierezh. ar gwashañ, evel pa vije al lenner o klask an harzoù d'e varregezh da fromañ. A-benn an diwezh e teuer eta da dermenañ al lennegezh evel pezh a vez skrivet

e doare da genderc'hañ el lenner ur fromad. Hag e c'heller ouzhpennañ diouzh-tu ez eo an hini wellañ an hini a c'hell dre he hentoù dezhi kenderc'hañ ar fromad donañ ha gwirionañ.

Rak dellid, daioni, un oberenn ne vez ket kavet hepken e nerzh ha doare an trivlierezh a sav diwar he lenn, nemet ivez e daioni an hentoù a zo dezhi. Sed perak e vez dewerzhet dellid an oberenn diwar daou savboent : hini daioni an danvez, hini daioni an doare; an hini pouezusañ piv a gredfe e lavarout ?

AN DRIN

Ar barzh, pa skriv e warzioù "evitañ e-unan" ne fell ket dezhañ lavarout n'eus ket azhoma da vout lennet; anez e vanje dilavar meur a varzhoneg gear e ifern yen an traoù dic'hanedigezh. Pezh a fell dezhañ lavarout avat eo ne sent ket, pa skriv, d'ur rediezh a-ziavaez; ennañ emañ ar rediezh hag ar gwerzennoù a darzh dioutañ hep dezho bout kerc'het gant ezhommoù. Pezh a fell dezhañ diskleriañ en e werzennoù n'eo ket un taolennadur, n'eo ket un displeg-adur, n'eo ket un diskleriadur, nemet, dibourc'het eus gwiskadur steriadurel ha sonerezhel ar varzhoniezh, ur garm, un ezigarm, ur p'ruiad eztaolet. Perak eo e rank ar skrivagner kinnig an eztaoladenn-se da asant al lenner ? Dre ma vez pep garm ur goulenn hag un embann.

Dav e ve marteze mont endro da zero an eztauler, d'ar mara m'emañ ar c'hrouadur nevez vet o klask tizhout gant e vouezh bevennoù dianav e ved, kavout speurennoù ar gloenn. O paouez kuitaat ur baradoz kloz, tomm hag heverz, en em gav a daol-trumm en ur bed diharzoù, yen, diarev, argollus. Betek-hen n'en deus em vezzet e-unan nemet evel un darn eus ar boud m'emañ klesket ennañ; war un dro en em gav bev ha dizrann, un hini, eñ, hag e kouezh warnañ glac'har an anoued, anken an dianav. N'eur ket evit dewerzhañ live ar fromad a sav ennañ. Moarvat eo un hollad dizigemm, ennañ war un dro souezh, spouron, fiziañs ha tzeac'hgen. Mar dalc'homp koun ez eo an hini kentañ, ha ne deus eñvoradenn ebet da gefveriañ gantañ ha digreskiñ e dalvoudegezh, ez omp douget da grediñ ez eo ar fromad pouezusañ e buhez mab-den, an hini e

vezo keñveriet outañ ar re a zeuy war e lexc'h. Ha marse ne vezo merzet unan all par gantañ; chom a ray an hini klok, ha diwar an eñvor dianzav anezhañ a vezo diferet marteze da viken moneadur an den.

Dic'hlanidigezh ar fromad-se eo a c'han ar garm, kentañ oberenn an den, kentañ arver eus e c'halloudezhioù. N'eus oberenn vev ebet a ve dijezo. Petra e c'hell bezañ hini ur c'hrouadur nevez c'hanet nemet embannidigezh e vout, galv d'ar baradoz kollet, enklask war ar bed nevez ? Evel ur radar e klask un heklav, war un dro testeni d'e vout ha testeni digant ar bad. Embann a ra ez eo un ninienn, diforc'h ha dirann, un den, hag e klask gouzout eus petra eo diforc'h, ha betek pegeit ez a e zibarelezh. Garmañ a ra. Ha petore burzhud ! sed en e gichen mouezh kufiv e vamm, tommer e vamm, karantez e vamm. N'eus nemet gervel hag e vez titouret war e genvoud, tost-ast endro outañ klouarjenn ar baradoz, distanet d'e anken : gouzout, gwasked, frealz.

Sed aze ur gentel na vo biken ankounac'haet. Hiviziken e vezo pep ez-taoladenn kement hag embann e zenelezh, e zibarelezh, goulenn un asant dezhi, gortoz ur gopr. Ma'z a war goazhañ dre ma kresk, marteze, talvoudigezh a-genfeur ar prouiadoù, diouzh ma tesk skeuliad an talvoudigezhioù, don e chom sanket ennañ, da viken, ezhom an ezteuler, ha koun an disoc'hoù.

War an arver anezhañ eo emañ diazezet al lennegezh. Arabat krediñ emson o klask reiñ da wir n'eo al lennegezh nemet garm ar bugel dezouget en e oad gour; nann, ne ran nemet diskouez par ma c'hellan penaos eo deut an den da verzout talvoudigezh an ezteuler, eleze embann fromus un dibarelezh, perak e tenn arver anezhañ, ha pe da zisoc'h. Danvez eztaol an den deut d'e oad zo avel-reizh disheñvel, dre m'eo bet maget hag adstummet e zibarelezh, a-feur ma kreske, dindan levezon ar gevredigezh.

Rak, adel m'eo disrannet, m'eo un hinienn dibar, e krog da werediñ warnañ nerzhioù an amdro ha pergen delanv e gendud ma rank bezañ diouzh o asant doareoù e vout. Ar gwared-se a denn da heñvelaat e zibarelezh ouzh

hini e gendud, d'e glenkañ en ur rumm. Kelennet e vez dezhañ, dishan, e rank em azasaat ouzh emlegadoù ar vuhez kevredigezhel. Gourc'hinniget e vez dezhañ patrom an den kevredigezhel, patrom ar peurzen, ma rank denesat outañ ar muiañ gwellañ dindan boan a vout kastizot. Bozek pe reuzeudik e vezo diouzh ma tostaj pe ma pellañ diouzh ar patrom-se. Kelennet e vez dezhañ ez eus dezhañ tuioù dianzavus, c'hoantigezhioù, sonioù, goanagoù, berzet. Berzet eo outo bezañ. Ha pe n'eus ket tu dezho da chom hep bezañ e rankont da vihanañ menel dieztaol. Berniet, moustrer, e vezont kuzhet e deun an isemskiant, ma kav d'an hinienn end-seun n'eus ket bet anezho. War ar bern lastoz-se eo emañ da vleuniañ glasvez al lennegezh.

Mar geller kermañ hag adstummañ diavaez an den, an danvez avat n'heller ket. Hag an danvez a ya d'e ober nerzhioù hag a glask dibaouez restauler dezhañ an doare a zere outo, ar stumm orinel, tonket dezhañ. Lies eo doareoù an danvez-se. Doreout a reont a dost pe a bell, a wall bell zoken, ouzh patrom ar peurzen. Ha ken tost hag e ve, ken heñvel a-wezhioù, n'ankounac'haomp ket eo sanket don e kaouded an den emañ kenstag ar bout hag ar bezañ disheñvel; bezañ heñvel zo kement ha na vezañ. En ur bouezañ war zoare pe zoare e kaver hentoù diniver da vout dibar; bez' e c'heller o rummañ e daou : pe mont war hent ar beurzenelezh war-du an dreist-denelezh, pe mont war hini ar stoum, ar c'hillañ zoken, war-du an hiniennelezh, ar pellañ ma c'hall diouzh ar patrom.

En daouad-se emañ, a gav din, orin an div lennegezh : an hini a gemer da zivoud an den gourc'hinniget diouzh an ezhommoù kevredigezhel, hag an hini a eztaol an den diouzh ar wirionez don; hini ar beur-batromelezh, hag hini an dibatromelezh.

Orin al lennegezh ? Disklexiet hon eus orin an ezhom ezteuler, orin ar skrivañ. Div elfenn avat a ya da ober al lennegezh : ar skrivañ hag al lenn.

Perak eo e lenner ? N'eo ket al lenn un ober askorek; ne zogas d'al lenner buzed ebet, netra nemet plijadur, sevenidigezh an ezhom a sil derez. Petra eo an ezhom-se ? hini ar c'helaouerezh ? hini an nevezinti ? Dolc'h-

omp koun e vez barnet un oberenn lennegezh diwar daou savboent : hini he zalvoudegezh denel, hini talvoudegezh kalvezel he stumm. Dewarzhed e vez an talvoudegezhioù-se diouzh nerzh kendrec'hus ha daioni ar fromad eztaolet, ha diwar c'halloud ezgeriañ ar furn. Pep lenner avat ez eus ennañ ur skeudenn hag un urzhaz, diemveizet a-wezhioù, nemet kreñvoc'h a ee, eus doareoù ar peuzzen, koulz hag un daolenn livet ennañ eus e gevoud; heñvel ouzh ar skrivagner emañ o klask un asant d'e vout, ur gwiriekadur d'an daolenn, un anzav d'e wirionez. Al lenn zo evitañ keñveriañ an urzhaz hag an daolenn-se gant ar re a zo empleget en oberenn. Marteze hep gouzout dezhañ. Hag ar fromad a zeu ennañ zo testenit d'an asant a ro d'an urzhaz ha d'an daolenn-se. D'al lenner koulz ha d'ar skrivagner eo ar fromad-se un asant d'e wirionez, amprouadur e skeudenn eus ar c'henvoud. Kensturiel eo o moneadur, an eil o c'houlenn digant egile an hevelep anzav, an hevelep gwiriekadur. Un eskemm eo al lennegezh, galv Mowgli er janglenn : "Ni zo an un ouenn, te ha me..." hag ar respont : "Ni zo an un ouenn..."

AN HENTENNOU - AR C'HEFRIDIOU

Diouzh hon eus gwelet e tleje al lennegezh bastañ da zaou ezhomm war un dro : embann boud ar skrivagner dibar hag embann hini al lenner ken dibar all; hag ouzhpenn-se diskouez an unouennelezh.

Hevezh eo n'en em ziskouez ket an aozour, nemet dibaot a waz ha dre gildroioù, evel o klask mont da zroist-den. N'eo ket e lorc'h dezhañ eo a embann; dere'heil a ra soñj ez eus eztaoladennoù berzet. Dre hanterouriezh tudennoù empentet eo e ra. Aze emañ, marteze, oxin ar pilpousezrezh a zo gwir anien al lennegezh.

War zigarez taolenniñ tudennoù eo e zezo taolenniñ hag eztauler e drivlierezh-efñ, e c'hoantegezhioù, e geseennoù, e sioù hag e vorc'hadoù kuzh, ha, pargen marteze, danevell ar stoum en deus renet ouzh ar patrom den evit chom dibar. N'en deus d'ober evit se nemet dibab er yoc'had trivliadoù

dieztaol a zo bet sansilhet gentañ en e isemskiant. Ar re-se eo en deus ezhomm asant hag anzav evito, hag ouzh ar re-se eo e responto gant ur fromad heñvel al lenner.

Peogwir ez eus eztaoladennoù berzet e rank ar skrivagner kemer hentoù treuz; e-lec'h komz en e anv-efñ e komz dre hanterouriezh unan all. Ur mare zo bet end-seun ma ne gomze nemet e-lec'h unan all, e-lec'h hag anv ar re all. En he derou edo displeget al lennegezh a c'hencu da skouarn, ma c'hoarveze anezhi eus kontadennoù, mojennoù meuriadel, danevelloù damistorel, kanennoù brezel pe liderezh. Ne oa ket an danvez tra an oberour; tra al lenner, ar selaouer kentoc'h, ne lavaran ket. Alias e kemere ar selaouerien ur perzh oberiel en displegadur zoken; korioù an dramaoù gresianek a ro dimp un albez eus an doare; addisplegañ a raent war e lerc'h dibenn ar pozioù pe ar pennadoù fromusañ; mont a raent alias ur pennad hir a-walc'h gant an danevell; moarvat e vezent kiriek un tamm mat d'he stumm. Dre vras e oa an danvez perc'hentiezh an holl, labour remziadoù tud oc'h azlavarout an eil war lerc'h egile dezrevell darvoudoù tremenet pell pe bulloc'h 'zo, pep hini diouzh e vod o kemañ tra pe dra, o tilezel pe oc'h ouzhpennañ. Tal ouzh tal gant e selaouerien ne oa ket an oberour ar mestr war zivoud ar c'han-diskan, prezeg-disprezeg-se.

Petra neuze oa perzh an oberour ?

Perek zoken ez ae darn da selaouerien hag un nebeut da oberour ?

Pezh a rae da gentañ, moarvat, an diforc'h etrezo eo e oa gant hemañ perzhioù arbennik. Bez' e c'halle bout an hini gwellañ e eñvor, fraesañ e zistagadur, kreñvañ e vouezh, barrekañ war ar framañ bonnoù kounadus, pe a ouie ar gwellañ stouvañ toulloù e stauenn an danevell. Moarvat e oa ivez ar blenier, evel e c'hoarvez atav an engroezioù, an hini a oar pezh a zo da ober, zo barrek da genurzhiañ, da gondoniañ un displegadeg. Ma n'edo ket mestr war an danvez e veze mestr war stumm, doare ha liv an displegadeg. Diouzh e berzhioù efñ, diouzh e zaioni-efñ edo perzhioù ha daioni an oberenn.

War zigarez eztauler ar meuriad, netra nemet dre ar stumm ez eztaole e

fromadoù dezhañ. Argemer a rae digent ar meuriad ur gefridi, nemet war un dro, dre un dro widre diemskiantek, ec'h eztaole dre ar stumm e anien dezhañ. Asantet en dous da lakaat warnañ e-unan, ha hep gouzout dezhañ alies, gweenn ar peurzen, ardamez ar meuriad, hag argemeret ar gefridi da ezteuler e ar-c'hoentou mont da zrest-den. Dindan argweonn avat e kendalc'h an den; n'eo ket an den klok ha digontamm rak an desped dezhañ n'eo ket bet dizisoc'h gwered ar c'helenn; disheñvel eo koulskoude e doare pe zoare diouzh ar peurzen, ha gant ar gefridi fiziet ennañ, dingeladur koulz hag asant, eo warnañ embann an disheñvalded-se. War un dro gant ar gefridi fiziet ennañ eo e zlead ez-teuler e anien dezhañ, e wirionez.

N'aur ket evit lavarout e chomas atav disablant ar peurzen ouzh an doare-se da dec'hout diouzh e veli. Douget e vijen a-walc'h da welout er reolennoù kalvezel ken strizh lakaet a-wezhioù war an aozourion, ar c'hlot- ennoù diabarzh, reolenn an teir unded, hag all, ur roudenn eus arnodoù pilpous da lakaat en ereoù pezh zo diereadus dre anien, ar stumm.

Ma'z eo er stumm e veze ezgeriet gant an aozour gwirionez e zenelezh, ne oa ket a-walc'h. Ne c'helle ket gouzout da venal etre harzoù ar peurzen, gaouiat evit un darn anezhañ, divastus a-grenn evit an darn all, enket en e azasidigezh dik ouzh ezhommoù kenurzhiaadurel un den kenurzhiaadurel.

Kefridiad, ha dre se hualet, edo un den ha dre se dieub; ar perzh pennañ d'an den disheñvel eo ar rezid ha ne c'hell bout den nemet dre aloubiñ e holl hinionnelezh, e holl zenelezh betek an harzoù pellañ ma'z eus. Pezh a zo oberadus gant an den, pezh a zo merzadus gantañ, pezh a zo meizadus, pep tre a rank kouezhañ etre e grabanoù.

Al lennegezh, eta, domani obeziadegezh, a rank bout ec'hon a-walc'h da ziskouezata en o rezid perzhioù denel an oberour. Ret e oa da hemañ gallout dibab an darvezenteziou, ar plegennoù hag al lec'hiaourioù a c'helle lakaat da vezañ enno an tudennoù, dougerion e weledigezh eus ar bed. Kregiñ a reas da gentañ dre ouzhpennañ d'arvoudoù e dibunadeg kantreadennoù harzoù ar

meuriad, ha kenderc'hel a reas dre grouiñ harozed, ardamezioù dezouger e fromadoù.

Sed peneos ha perak eo dout an aozour da vout mestr war an darvez ker-kent hag eo bet dieubet diouzh bezañs korfal ar salaouer. Aesoc'h a se eo dezhañ taolenniñ skeudenn ar bed hag an dud evel m'o gwel, evel ma kred ez int, evel ma karfe e vent. Diskouez a ra d'al lenner tudennoù o stourm, o strivañ er bed-se, hag e klask e dedennañ ennañ da gemer perzh en o fromadoù. Fromad al lenner a vezo dezhañ war un dro asant da wirionez e daolenn hag asant d'e wirionded-efñ, ha d'a vout.

Lies an elfennoù a ya d'ober ar boud-se, darn bet chouket ennañ gant ar peurzen pe wisket warnañ. Stummet eo bet, atav, gant kentelioù hir digant ar patrom den hag a-wezhioù gant emgannoù. N'eo ket atav hep poan eo bet degemeret ar c'hentelioù, n'eo ket hep gouli eo bet renat an emgannoù; kleiz- ennoù a chom war o lerc'h hag a-kreiz an asantadennoù emsavioù dispac'her.

Tud 'zo, neozh, kendrec'het o foell pe zrestat o enebiezh a zegemer da vat ar peurzen. Evito eo a vez taolennet harozed ha tud veur o trac'hif war an darvoudoù pe war o c'hoantegezhioù. Enno e tispleg ar skrivagner ar perzhioù mat a zegemer an den skouer pe ar re a nac'h bout sklavelet ganto.

Sed pezh a ya d'ober al lennegezh vat, pe gentoc'h, lennegezh ar Mad. N'eus ket da zezvarn ez eo mat al lennegezh-se, dre anien, gwelloc'h eget unan all. Pezh a c'hellor menegiñ eo n'eus ket anezhi oberennoù a zispac'h, dre vras. N'eo ket anni e vez merzet ar perzhioù blenier, urzhier, disklerier a rank, diouzh ret, diskouez ar skrivagner disantus ouzh gourc'hemannoù ar peurzen.

N'ankounac'haomp ket, padal, e c'hell an dreist-den, peurzisoc'h ar peurzen, bezañ anzavet evel an hini a gas ar perzhioù mat betek harzoù an dic'houzañvadus. Mont a se d'e dro da Vessiah, da zispac'her, da adurzhier. Da zic'hortozet.

Met an tu aesañ da anataat an dibarelezh eo he diskouez o stourm ouzh

beli an den kevredigezhel. Un urzhaz dezhañ a rank stummañ hag ober evel pa vije degemeret da reizh. Ha paogwir ne vez ket asantet hep stourm d'an urzh kevredigezhel, kemant hag e lako en arvar a vo sellot outañ evel gwirionoc'h a so. Sed aze pezh a ra danvez an oberennoù lennegel, hini ar penn-oberoù brasañ, koulz hag ar romantoù polis mui pe vu: dizellid : stourm an den d'en em zisheñvelaat diouz ar peuzen, pe dre vont dreist d'an heñvelidigezh ha tizhout da zont e-unan da skouer, pe distreiñ d'an aniel, loenel zoken, sellot outañ evel dinamm ha diantek.

Taolomp pled pegen bras eo al lec'h dalc'het gant ar serc'houriezh a danvez an holl zanevelloù a zo divout al lennegezh; da greizenn dodennañ e kavez atav pe dost, ar c'hoant d'ur plac'h, ar c'heuz d'ur veouez, an hiraezh d'ur baradoz kollet pe da zont. Drezi eo e vez diskleriet ur c'halz a oberoù, ha pa ne ve ket diwar welout devouder anat an oberenn.

Arabat ankounac'haat eo bet ar vamm test kentañ, test nemetañ a-wezhioù, d'ar gann, da eztaoladenn gentañ an den. Eus orin ar vuhez ez a aes da bal, hag an trivlierezh a sav diwar he manegif a zalc'h koun eus al levenez divent a c'hanas gant hec'h asant da c'houlenn enkrezet an hini bihan. Ha petra eo ar garantez ma n'eo ket ar fiziañs en asant-se ? un asant klok, groñs, distrob. Sed a ro d'ar garantez he fouez hag he zalvoudegezh evel devouder fromadoù krañv, daoust ma tisklerier anezhi evel un hekleb da verzhidigezh ar gened.

KUDENN AR GENED

N'eus ket un arz na zegemerfe ket da gefridi krouidigezh ar Gened. Evit pezh a sell ouzh al lennegezh, avat, n'ouzon ket ha n'eus ket aze ur pilpouseurezh ouzhpenn. Ma tegemeromp da wir ez eo an eztauler kofridi gentañ ar skrivagner ne c'hell ar gened dont nemet da heul, hag e tlefe bout aberzet da wirionez an eztauler, bez' e tlefed sellout outi evel un adaskored. Moarvat eo end-ao ar wirionez unan eus elfennoù ar gened; marteze eo ivez merzhidigezh ar gened kemant hag anzav eo bet tizhet ar pal.

N'ouzon ket ha bez' ez eus ur c'heal rakvoudel eus ar gened. Marteze

ez eus ur beurgened ha kenedoù bihan, ur gened peurbadel hag ur gened pront-adel, ur gened heilel hag ur gened hiniannel. Gant pep tomenadur emañ, ma gred, merk ar c'houlz, merk an tuzmenour, merk an ezhommoù. Unan eus ar ze zivezhañ eo an hini a lako ar gened e kenglotadur an dezo hag ar birvioù, e kenglotadur ar c'heal hag ar marzout. Aon em eus a ve bet kemmeskañ kened hag efedusted. Aesoc'h e vo moarvat saludif en ur dremen elfennoù darnel ar gened lennegel, hep reiñ da gradif ez eus tu d'he zizhout en ur vont dre hentennoù divizet etre bevannoù didremenadus. Ar vlezidigezh a c'hell kinnig bonnoù; ar gened zo an tu-hont d'ar bonnoù.

Bez' e c'heller arlakaat e kenglot gant ar peurvad pe ar peursevenet, pe ar peur-pezh-a-garot, ar wirionez eo ez em gaver a-daol-trumm direzi, ha darn a chom diseblant ha darn zo skoet gant ar foaltr. Ha pa'z eo ar skrivagner un arzour n'eus gopr ebet a ve gwell dezhañ eget en estlamm-se da desteni a zibarelezh, da hekleb d'e ezgarm.

Moarvat a vije mat klask termenañ petra eo perzhioù mat al lennegezh, pezh a ra he zalvoudegezh, he daioni, lezet ar-maez an arver kelennadurel a c'hell bezañ tennet diouti gant ar gevredigezh.

Bez' e c'heller reiñ meuloudioù d'an ijin kevrenveizek a ya da ampentif steudadoù darvoudoù gwirheñvel, an evezh a ya da fremmañ tresadur an tudennoù he da reizhañ en-dro dezho un amdro diouzh mennad ar skrivagner, ar soutilded a ya da verkañ an diforc'hoù munutañ, an nerzh groñs a ya da ziogeliñ pe da nac'hañ, an haelled hag ar gougantiz da livañ prouindoù an dud, ar vourdez da zisplegañ darvoudoù argollus, an eunder pa ne vez ket ezhomm eus skintin ar gerioù. Pezh a zo pouezus eo hep mar an dereadegezh, an azasaat ouzh un dezo. Un oberenn lennegel zo ur savadur treset pizh ma rank pep elfenn enni tizhout ur ratozh; ur c'hendoneurezh difazi eo a verk daioni an oberenn. Ar pep efedusañ a verzer e dibab ha kenstroll ar gerioù.

Ken e teu al lennegezh, tizhet ganti an harzoù ma kaj warno an deveiz-out hag an devezout, da vout ur c'hoari gerioù, pe n'eo ket ur c'hoari son-inoù, marteze arouez ar breinadur, marteze arouez an dreist-rezid adkavet.

+++

+

Meurzh 3 Eost 1965

GWANADUR AR C'HENSONENNOU

E BREZHONEG

gant Goulven Pennad

0. An holl a oar petra eo ar c'hemmadurioù dre vlotaat e brezhoneg; da skouer e vez lavaret e benn, e dud, a galon, e vuoc'h, e zorn, e c'har, e voger evit gerioù em ziskouez evel, bep eil, penn, tud, galon, vuoc'h, zorn, gar, moger, ha neuze, er yezhadurioù brezhonek e vezo lavaret "en degouezh-mañ-degouezh e c'hoarvez ar c'hemmoù-mañ :

p t k b d s m ."
b d g v z c'h v

Gwir eo an dra-se evit a sell ouzh ar skritur, met an holl re a lennas yezhadurioù brezhonek un tamm uhel, hini an Ao. Kervelle, da skouer, a oar ez eus kemmadurioù dre vlotaat all (sl. YBB 84-85). Evit ar yezhonicioupien a studi hanez ar yezh, hollekoc'h c'hoazh eo an anadenn a reomp "blotadurezh" anezhi peurliesañ, ha d'an anadenn hollekoc'h-se e roin an anv a "wanadurezh".

1. EMDROBREZH AR YEZHOU

Evit bezañ meizet gwelloc'h hag aesoc'h e livirin ur ger bennak a-zivout emdrobrezh ar yezhoù. Kant pemont vloaz zo, furcherion war ar yezhoù, evel La Tour d'Auvergne pe e genil Le Brigant, a gave dezhe ne gemme ket ar yezhoù, pe dost, nemet e vreinnet a-wezhioù. Da skouer, ar brezhoneg, evite, a oa ur yezh-vamm, ken sakr hag an hebreeg, nevetoc'h zoken, marteze

goulven pennad

a-walc'h, rak arouezioù a vreinadur a gaved en hebreeg a-
wezhioù na vezent ket kavet e brezhoneg. Setu amañ skouerioù
eus hentennoù ar vrizhkelteiegourion-se : hon tad dimp-ni holl
a oa arvet Adam hervez ar Bibl; petra oa ar ger-mañ avat,
keneve ar ger brezhonek had heuliet - ur breinadur hebreek
moarvat - gant ar ger-mall an - e-lec'h e heuliañ evel er
yesh-vamm -; Adam, neuze, a dal an had, hag anat eo dre ma
oa had mab-den... (Er hebreeg אדם "mab-den, den" a vez
staget ouzh ar wrizienn אדם "gell-ruz e oa"). Ur skouer
all. E mojennoù Hellaz e vez anv eus Titaned : meur a ziskl-
erriadur a gaver war an anv-mañ, gant Gregor a Rostren da
skouer : unan anezhe a vele amañ "(paotred) ti an tan"...
Hag all... Evel-se e oa aes prouñ e oa komset brezhoneg e
paradoz an douar. Arabat ober goap, avat, rak digarezioù a
oa d'ar vrizhkelteiegourion-se : ar c'uesonic'h a reomp anezhi
hiziv "yeshoniesh" ne oa ket diazezet sonn ha pa veze savet
gerdarzhadurioù forzh petore lizher a c'halle bezañ kommet
en un hini all; evel a lavare unan bennak, Voltaire mar em
eus soñj mat, "les voyelles ne comptent pas et les consonnes
s'échangent...". Hogen hiziv, douarened La Tour d'Auvergne
n'o deus met un digarez : o leziregezh a vir oute a seskiñ
hentennoù ar yeshoniesh. Niverus int c'hoazh padal hag e Breizh,
ken niverus, da nebeutañ, hag er broioù all. Anaout a reomp
re anezhe o deus tizhet zoken gounit ur vrazik a vrud e-touez
tud ar skolioù-meur, e-touez ar gelennerion-se, avat, n'int
ket yeshonourion a vicher...

Ha gwir eo ez eo diaesoc'h micher ar c'heltiegour eget
hini ar romanegour. Bezet, lakomp, ur Spagnad a vije chomet
un dek vloaziad bennak er skolioù, eleze ur paotr a-live
gant un deskadurezh eil derez. Pa lavar escribere, esperare,
e oar e veze lavaret gwezhall scribere, esperare e latin, ha
neuze, pa lavar spiritu e c'halle soñjal diouzhtu e kroge
gant g- ar ger latin kent ha ne vezo ket diaeg dezhañ adkav-
out spiritus. Hefivel, pa oar ez eus bet fabulari ha facere
a-raok hablar hag hacer, e klasko gant f- e latin ur ger
spagnek evel harina hag e kavo farina hep re a ziaester.
Sellomp bremañ ouzh ar gerioù brezhonek kevelep; kavout a
reomp : ekriyañ, goanaziñ, apered, komz, ober, bleud. N'eo
ket ken anat. An hini a sunas laezh ar vlezeez en e vugeliezh
discoursi a c'helle avat soñjal ez eus. evit re anezhe, gerioù
a orin latin evel scribere, spiritus, opera. Hogen ar re all ?

Ha c'hoazh, mar galler aes a-walc'h adkavout ar saveleannoù
a ren an tremen eus stad koshañ ur ger betek e stad nevesañ,

an enep n'eo ket ken anat. Ar re a studias un tammig ar jed-
oniezh a oar pegen diaes eo, e studi an debriñvonezh oberiata
gant reollun Bayes a ra war-dro tebiezh an amlegadoù. Da
skouer, hor Spagnad ken poellek en deus diazezet en e soñj ar
saveleñn : "La. f a ya da Sp. /f/, skrivet h-" a c'helle faziñ
aes-tre : kavout a ray en e yezh ar gerioù habere "en devout",
herbario "levr-plant"; mar fell dezhañ klask e latin gerioù
evel *fabere pe *ferbarium ne gavo ket e walc'h, rak ar gerioù-
se a zeu, en-wir, eus habere hag herbarium. Distagañ a ray ar
saveleñn hiziviken : "Sp. /f/, skrivet h- a c'helle dont pe eus
La. f-, pe eus La. h-, ha marteze diwar orinoù all". Goulakaomp
bremañ e vije set da get hendad ar spagneg, eleze al latin, ha
na ouije hor Spagnad yezh romanek all ebet, morse ne vije evit
lavarout : "ar ger-mañ skrivet bremañ h- em yezh a zavo d'un
hen c'her gant f- ha neket gant h-". Dic'hallus krena e vije
an dibeb evitañ. Hogen, mar goar an italianeg, e savo an daolenn

Sp. <u>habere</u>	It. <u>avere</u>	Sp. <u>harina</u>	It. <u>farina</u>
Sp. <u>herbario</u>	It. <u>erbario</u>	Sp. <u>hacer</u>	It. <u>fare</u>

Neuze, dre geñveriañ stad vremañ div yezh kar evel ar spagneg
hag an italianeg, e c'helle damwelout un disoc'h. Mar goar
ouzhpenn ar portugaleg e kavo :

Sp. <u>habere</u>	It. <u>avere</u>	Pt. <u>haver</u>	Sp. <u>harina</u>	It. <u>farina</u>	Pt. <u>farinha</u>
Sp. <u>herbario</u>	It. <u>erbario</u>	Pt. <u>herbario</u>	Sp. <u>hacer</u>	It. <u>fare</u>	Pt. <u>fazer</u>

Splannoc'h eo an daolenn neuze, ha gant ma oufe ar galleg
ouzhpenn, en defe :

Sp. <u>habere</u>	It. <u>avere</u>	Pt. <u>haver</u>	Gl. <u>avoir</u>
Sp. <u>herbario</u>	It. <u>erbario</u>	Pt. <u>herbario</u>	Gl. <u>herbier</u>
Sp. <u>harina</u>	It. <u>farina</u>	Pt. <u>farinha</u>	Gl. <u>farine</u>
Sp. <u>hacer</u>	It. <u>fare</u>	Pt. <u>fazer</u>	Gl. <u>faire</u>

An enebadurioù ha keñverioù-se ne c'hellont ket dont diwar
zegouezh, ha neuze e c'helle "adsevel ar c'hevromaneg" ha
skrivañ :

Sp. <u>h-</u> / <u>f</u> /	= It. <u>h-</u> / <u>f</u> /	= Pt. <u>h-</u> / <u>f</u> /	= Gl. <u>h-</u> / <u>f</u> /	=> kRm. * <u>h-</u> / <u>f</u> /
Sp. <u>h-</u> / <u>f</u> /	= It. <u>f-</u> / <u>f</u> /	= Pt. <u>f-</u> / <u>f</u> /	= Gl. <u>f-</u> / <u>f</u> /	=> kRm. * <u>f-</u> / <u>f</u> /

Adsevel ar c'hevromaneg a lavaran, ha neket al latin; rak
arabat em douzhañ : ne c'helle biken adsevel al latin en e
bezh dre geñveriañ ar yezhoù romanek bremañ. Da skouer, ar

stagell latin ut "ma, evit ma", ken boutin e latin klasel - an holl a reas troadurioù latin el lise a oar pegen braouac'hus eo evit al latinegourion yaouank ! ne lezas ket an disterañ roud anezhi e nep yezh romanek ha mar bije al latin aet da get pemzek kantved zo, hini ebet ac'hanomp ne c'hallje gouzout ez oa bet anezhi.

Ni, Brezhoned, emamp, evit a sell ouzh hor yezh, er stad, pe dost, ma vije ur Spagnad, un Italiad, ur Portugalad, ur Gall, mar bije aet da get an holl skridoù latin kozh, o lezel da dreuzvevañ hepken un enskrivadur besnak, un anv-den pe un anv-lec'h kollet amañ pe ahont en ur skrid estren kozh. Setu perak, pa fell dimp gouzout "orin" ar ger-mañ-ger, eleze e stumm er pevere kantved, lakomp, n'hon eus met un hentenn : keñveriañ ar yezhoù keltiek bremañ, ar skridoù koshañ anezhe deut betek ennomp, mar gellomp henn ober, ha dezastum diwar ar studi-se "savelennoù yezhoniel" a ziskouezo dimp madik a-walc'h dremm hor yezh er c'hantved-hont, eleze ar predeneg, hag amañ, war-lerc'h ar C'hel. K. Jackson, e ran un diforc'h etre ar predeneg, yezh adsavet, evel ar c'hevromaneg, hag ar breizhveureg, a oa komzet neuze (evel al latin) ha na c'hallimp biken anaout, nemet e ve restalet dimp, dre un degouezh peuz-diwrhañval, ur skrid kollet. Hogen, diwar ar brezhoneg e-unan-penn, ha diwar ar brezhoneg bremañ pergen, ne c'haller goulakaat tra diogel ebet, na gwirhañval zoken, pezh a laka da c'hoariell vugel pep istor ar brezhoneg savet diwar studi ar brezhonegoù bremañ hepken.

Ar savelennoù yezhoniel-se a voe diazezet da vat, evit a sell ouzh ar yezhoù indezeuropek, e derou ar c'hantved diwezhañ gant an Danad Rask hag an Alaman Bopp. Heulierion o deus bet anvet Schleicher, Brugmann, Saussure, Hirt, Meillet, Kurylowicz, Benveniste, h.a. Evit a sell ouzh ar yezhoù keltiek, ar geltiegourien a voe krouet e 1853 gant embannidigezh Grammatica Celtica an Alaman Johann Kaspar Zeuss, un den hemañ a vezo vere dignum et iustum un deis bonnak sevel e zelwenn war leur-gér kêrbenn Vreizh. Ar Grammatica Celtica zo ur pikol oberenn e latin ma veze keñveriet enni, evit ar wezh kentañ en un doare gouezoniel, an iwerzhoneg, ar galianeg hag hor yezhoù predenek : kembraeg, kerneveg ha brezhoneg. Tud zo deut ivez war-lerc'h Zeuss hag evit meneññ amañ ar re bennañ hepken a studias hor yezh-ni e roin anvioù d'Arbois de Jubainville, Whitley Stokes, Holger Pedersen, Kenneth Jackson, hag ar Vreizh-iz Jozef Loth, Emil Ernault ha Leon Fleuriot. War labourioù ar

re-se eo diazezet an anaoudegezh ouezoniel a c'hellomp hor bout hiziv eus hor yezh.

2. BLOTADUR AR C'HENSONENNOU

Lavaret em eus er penn-derou ez oa hollekoc'h eget na greded peurliesañ anadenn ar vlotadurezh, hag e raen "gwanadurezh" eus an anadenn hollek. Petra eo neuze ar wanadurezh ? Setu an termenadur a gaver e lev'r R. Thurneysen, A Grammar of Old Irish, Dublin 1946, p. 74 : "Lenition... is the term used to describe a mutation of consonants which normally originated in a reduction of the energy employed in their articulation. It affected not only medial, but also such initial consonants as were closely associated with the preceding word."

Setu da gentañ a rank hol lakaat evezhiek rak Thurneysen a bouez dreist-holl war kensonennoù mezc'her (eleze e kreiz ur ger) ha da c'houde hepken war kensonennoù pennc'her, tra na anavezomp met ar re-mañ diwar studi ar yezhadurioù brezhonek. Diforc'h eo ar savboent, tra ma komz Thurneysen eus un anadenn dreanadeg - eleze e terc'hel kont eus hanez ha kenthanez ar yezh - ne bleustromp peurliesañ met war anadennoù kevadeg - eleze eus reizhiad ar yezh a-vremañ - pa zeskomp ar brezhoneg. Degasomp skouerioù. Ober a rin gant gerioù testeniek aet e galianeg, neket dre ma welan evel unan bennak er yezh-se mammenn hor brezhoneg, pell ac'han, met dre ma'z eo ar yezh keltiek o reññ dimp ar skouerioù koshañ. E galianeg neuze, eleze, war-dro derou an amervezh, e kaved ur ger abonē "stêr"; bremañ hon eus Kb. afon, Br. aven : lavarout a c'haller enta : ar /b/ kozh zo aet bremañ da /v/ e brezhoneg hag e kembraeg; ouzh Gn. catarno- ez ateb bremañ Kb. cadarn, Br. kadarn : /t/ zo aet da /d/; Gn. lemo-, Kb. llef, Kn. leF, Br. leff : /m/ zo aet da /v/ pe /f/; h.a., h.a. Evit ar yezhoù predenek neuze e vezo lavaret e c'hoarvezas ur vlotadurezh, etre prantad ar predeneg hag an amzer vremañ, eus ar c'hensonennoù mezc'her (lec'hiet en orin etre div sonenn pe war-lerc'h ul linkenn) peuzheñvel ouzh blotadurezh ar c'hensonennoù pennc'her er yezhoù a-vremañ.

Ur gwanadur a vez kavet ivez en iwerzhoneg, met en un doare diforc'h, eleze, ar stankennoù a ya da c'hwezhennoù, sk. /k/ > /x/, /g/ > /x/, h.a. Amañ da heul ne gomzin ket eus an iwerzhoneg, met ret eo dere'hel soñj ez eus bet er yezh-se kemmadurioù kevelep gant re ar predenegoù. Pelloc'h e studifomp

ar c'hwezhadurezh er yezhoù predenek.

Ur gwanadur a c'hremm en distagerezh eo ar blotadur. Evit spisaat kement-mañ e rin gant ar sifroù roet gant an Ao. Falc'hun en e Système consonantique du breton, Rennes, 1951 (SCB). Evit gwir, ur fazi e ve sellout ouzh ar sifroù-se evel peurliozel, rak an amodennoù bet graet gantañ n'int ket niverus a-walc'h, da gentañ, ha, d'an eil ha dreist-holl, skouerioù eus distagadur an aozer nemetken ez eus anezhe, ha neuze, ne c'hellont talvezout met evit skouerioù an distagadur eus un den lennek genidik eus ar Vourc'h-Wenn, met ur vrasvent a roont a c'hellomp degemer, hag a rankomp degemer zoken dre n'hon eus sifr all ebet a-zivout distagadur ar brezhoneg. E-lec'h muzuliañ er gremm, an Ao. Falc'hun en deus muzuliet padelezh ar c'hensonennoù, met o vevañ m'emañ a-gevreizh an eil hag egile, e c'haller sellout ouzh ar badelezh evel arouezius eus ar gremm.

Setu neuze a gaver p. 110 ar SCB, padelezh ar c'hensonennoù er vouezhiadenn oc'h heuliañ ar pouez-mouezh e rannyezh Leon e kentieilennoù :

[p] = 9,33 cs [t] = 11,00 cs [k] = 10,37 cs [m] = 10,00 cs
[b] = 5,62 cs [d] = 4,94 cs [g] = 4,40 cs
[ɸ] = 4,50 cs [z] = 4,00 cs [ʃ] = 4,16 cs [v] = 4,83 cs

Ar sifroù-se o deus nebeut a dalvoudégezh enne o-unan : anat eo e c'hell ar c'hensonennoù bezañ distaget hiroc'h pe verroc'h e kembraeg, da skouer, ha den ne oar penaos e vezent distaget da vare ar breizhveureg. Met ar feuriadoù etreza a hafval heuliañ ur savelenn a soniadoniezh hollek (s. e levr Falc'hun ar pezh a lavarer eus an italianeg hag eus ar magiareg). Setu perak e taolimp evezh ouzh ar feuriadoù :

[p]/[b] = 1,66 [t]/[d] = 2,22 [k]/[g] = 2,36 [m]/[v] = 2,07
[ɸ]/[z] = 1,25 [d]/[z] = 1,23 [g]/[ʃ] = 1,06

Gwelout a reomp anat, evel-henn ez eus bet ur gwanadur a c'hremm e-kreiz ar gerioù. Evit gwir, n'eus ket bet [d]/[z] na [g]/[ʃ], hogen, bep eil, [d]/[z] > [t]/[d] > [k]/[g] ha [g]/[ʃ] > [p]/[b] met ar feuriadoù zo brasoc'h eget 1 forzh penaos. Evit derou ar gerioù ar c'hemmañ zo bet un tammig disheñvel.

o

3. BLOTADUR AR C'HENSONENNOU PENNC'HER

An Ao. Falc'hun en deus merzhet ez oa disheñvel padelezh ar c'hensonennoù heglev pennc'her diouzh hini an hevelep kensonennoù mezc'her. Reñf a rae d'ar fed-mañ un dalvoudégezh vouezhiadoniell, pezh a oa ur fazi, hervezon, rak un dalvoudégezh soniadoniell en deus hepken, war a hafval (s. Hor Yezh, 40, 18-20), e teodyezh ar Vourc'h-Wenn zoken. Aroueziañ a rin gant [ʃ] ar gensonenn greñvoc'h. Setu amañ, hervez SCB 65, padelezh ar c'hensonennoù pennc'her. Merzhet a vezo ez eo disheñvel padelezh ar c'hensonennoù eun diouzh ar gwerzhadoù roet uheloc'h, pezh a ziskouez anat hon eus amañ un anadenn soniadoniell ha neket mouezhiadoniell :

[p] = 8,6 cs [t] = 9,5 cs [k] = 8,5 cs
[b] = 6,8 cs [d] = 5,6 cs [g] = 5,2 cs

Pezh a ro ar feuriadoù :

[p]/[b] = 1,26 [t]/[d] = 1,70 [k]/[g] = 1,63

Ar pezh a fell dimp gouzout avat eo ar pezh a c'hoarvez gant ar c'hemmadurioù pennc'her. An Ao. Falc'hun, siwazh, n'en deus ket kredet arnodenniñ a-zivout padelezh ar c'hwezhennoù pennc'her, pe, da nebeutañ, menegiñ e zisoc'hoù en e levr, ha n'eo ket bet peurembannet e studi dalvoudek e Sav (merkomp hepken e rae eno gant lamadurioù ha neket gant feuriadoù, pezh na c'halle bezañ met touellus murlbet, sl. Sav 31, 1944, 50-53) Met da grediñ eo ez eus etreza hag ar c'hwezhennoù mezc'her ur feuriad damheñvel ouzh an hini a gavas evit ar stankennoù, setu perak e skrivimp :

$\frac{[p]}{[b]} \frac{[t]}{[d]} \times \frac{[k]}{[g]} = 1,58$ $\frac{[p]}{[b]} \frac{[t]}{[d]} \times \frac{[d]}{[z]} = 2,10$ $\frac{[p]}{[b]} \frac{[t]}{[d]} \times \frac{[g]}{[ʃ]} = 1,73$

Gwelout a reer ez eus bet skrivet [p̂ t̂ k̂], rak diforc'h krenn eo tonkad ar blotadur e derou ur ger diouzh an hini e kreiz ur ger evel welimp bremañ. Gwelout a reer ivez ez eo ar gwerzhadoù-mañ damheñvel ouzh ar re a gaver evit an enebadur amglev/heglev mezc'her ha neket an enebadur heglev/c'hwezheglev mezc'her. Ar c'heitad evit ar blotadur pennc'her zo enta : 1,96 ≠ 2, eleze, dre vras, e vez dispignet div wezh nebeutoc'h a c'hremm distagañ en abeg d'ar vlotadurezh, e derou ar gerioù.

4. DOAREBOU AR BLOTADUR

War-lerc'h labourioù K. Jackson (Language and History in Early Britain, Edinburgh 1953 = LHEB 561), e ouzomp e c'hoarvezas ar blotadur er yezhoù predenek en eil hanterenn ar 5th ktvd. Setu penaos e c'hoarvezas an traoù hervez A. Martinet, Economie des changements linguistiques, Berne 1955 = BCL 260. Eveltañ e rir un diforc'h etre an daolenn vouezhiadoniell, eleze o tennañ d'ar Furm hag an daolenn soniadoniell, eleze o tennañ d'ar stumm. Kemeromp dabu c'her adsavet e predeneg diwar keñveriañ an teir yezh predenek *esjo durnos "e zorn" ha *budaros "bouzar".

1°-Er c'hentañ stad, eleze, a-rack eil hanterenn ar 5th ktvd, hon eus :

	* <u>esjo durnos</u>	* <u>budaros</u>
ent-vouezhiadoniell :	/esjo+durnos/	/budaros/
ent-soniadoniell :	[esjo durnos]	[budaros]

2°-En eil stad, pa grog ar blotadur, eleze, en eil hanterenn ar 5th ktvd:

	* <u>esjo durnos</u>	* <u>budaros</u>
ent-vouezhiadoniell :	/esjo+durnos/	/budaros/
ent-soniadoniell :	[esjo durnos]	[budaros]

Ne gemm ket an daolenn vouezhiadoniell (koshoc'h eo damfatedur ar mouezhiadennoù dibenn-c'her) evit a sell ouzh an /d/, rak [ð] n'eo met distagadur pep /d/ e lec'hioù resis divizet dre an amdro, eleze ur stumm.

3°-En trede stad, pa'z a da get ar mouezhiadennoù dibenn-c'her hag ar sonennoù-liamm etre div elfenn ur ger, eleze e kentañ hanterenn ar 6th kantved, e teu an daolenn da vezañ :

	* <u>esjo durnos</u>	* <u>budaros</u>
ent-vouezhiadoniell :	/e durn/	/buðar/
ent-soniadoniell :	[e durn]	[buðar]

4°-Ur pevare stad ez eus c'hoazh da c'houde, lakaomp war-dro an 1st ktvd evit /d/ predenek e brezhoneg, lakaomp oc'h evit /g/ predenek, tra m'emañ ar c'hemm o c'hoarvezout en hor mare-ni evit /b/ ha /m/ predenek. Evit /d/ e tibabin skouerioù BrL. ha BrE. a zo ar re azonetañ :

	BrL.	BrE.	BrL.	BrE.
ent-vouezhiadoniell :	/e durn/	/e ðorn/	/buðar/	/buðar/
ent-soniadoniell :	[e durn]	[i ðorn]	[buðar]	[buar]

Diwezhatoc'h c'hoazh e troas /ð/ da /z/, met ur gudenn all eo, deut war un dro diwar ur gwanadur ha diwar levezon ar galleg.

Pezh zo bet skrivet evit tonkad /d/ a c'hallfed skrivañ ivez evit /b/, /g/, /m/.

Met ur gudenn a hentennoniezh a sav amañ : dacust hag ar gwir hon eus da astenn d'ar predeneg devoudoù ar brezhoneg bremañ ? Dacust hag-sñ n'omp ket en arvar da gouezhañ e fazi ar Spagnad o klask adkavout *fabāre ha *ferbārium e latin ?

Da gentañ, evel a vce lavaret uheloc'h Pr. /g/ mezc'her zo aet da get en holl yezhoù predenek war-dro an 8th ktvd. da nebutañ; hogen, mard eo aet da get ivez e derou ur ger kembraek, sk. genau / si enau, pe kernevek, sk. ganow / y anow, miret eo bet e brezhoneg : genou / e c'henou, pezh na c'hell bezañ diskl-eriet nemet e ve goulakaet un diforc'h etre /g/ [g] penn-c'her ha /g/ [g] mezc'her e predeneg; evit a sell ouzh /d/ predenek, mont a ra dalc'hmat da Kb.[o] e derou ur ger, hogen, a-wezhioù, ez a da get e kreiz ur ger, sk. mewn, pezh zo anatoc'h c'hoazh en teodyezhoù kembraek : wsti :: wyddest; own :: oeddwn; todd :: toddod; dy :: dydd; roscor :: roscorid; claw :: clawdd; trvdy :: trydydd; pedwery :: pedwerydd, h.a. (Parry Williams, Similarity in the Phonology of Welsh and Breton 100, 108). Heñvel eo evit /b/ ha /m/ : ceis :: cefais; ada :: dyfod; gwais :: gwefus; moin :: ymofin, h.a. (l.m. 100), a c'haller keñveriañ gant larout, anaout, h.a.

Bez' e c'haller lavarout enta ez oa endeo un diforc'h soniadoniell e predeneg etre ar c'hensonennoù heglev penn-c'her hag ar c'hevelep re mezc'her.

5. AR C'HWEZHADUR

Diwar ur savbont kevadeg e vez graet un diforc'h etre ar blotadur hag ar c'hwezhadur. An Ao. Falc'hun a ya betek lavarout, zoken (SCB 100-102), ez eus ur "c'hreñvaat" eus ar c'hwezhadur, pezh a hañval diskouez ez eo bet toulllet gant e rakvarn gevadeg, o strishaat e enklask da zevoudoù an teodyezhoù brezhonek bremañ.

Lavaret e vez, da skouer, "war-lerc'h he, p a ya da i,

i a ya da g, k a ya da c'h". Met diwir eo pa seller ouzh ar brezhoneg diwar ur savboent treadingel; pezh a ranker lavarout zo : "pp predenek a ya d'ur soniad skrivet f bremañ e brezhoneg" ha netra ken.

E brezhoneg bremañ n'eus ket a gensonennoù gevellek, ha neuze, an Ao. Falc'hun ne voe ket evit muzuliañ gremm pe bad-elezh hevelop kensonennoù. Met, hervez studioù Maurice Grammont (*Traité de Phonétique*, 52), gremm ur gensonenn c'hevellek zo, dre vras, 7/4 hini ur gensonenn eeun. Degemeromp ar werzhad-se, neuze, ha ne vimp ket pell diouzh ar wirionez. Diouzh un tu all, kemeromp gwerzhadoù an Ao. Falc'hun evit [f s x] :

[pp] = 16,30 cs [tt] = 19,20 cs [kk] = 18,15 cs
[f] = 10,20 cs [s] = 11,12 cs [x] = 11,50 cs

Ar feuriadoù a vezo :

[pp]/[f] = 1,6 [tt]/[s] = 1,7 [kk]/[x] = 1,6

eleze gwerzhadoù brasoc'h a-bell eget 1, eleze c'hoazh ur gwanadur er gremm dispignet. Eveshaomp avat n'eo ket [tt]/[s] a c'hoarvezas, hogen [tt]/[θ], ar soniad-se o vevañ aet da get hogozik e pep lec'h e Breizh bremañ, met kreffoc'h eo [θ] eget [s], neuze e c'haller lavarout hon eus, dre vras, ur feuriad = 1,6 evit an holl. Forzh penaos, ar sifroù n'int bet degaset amañ met evit skeudenniñ gwelloc'h ar fed diazez, eleze : ur gwanadur eo ar c'hwezhadur. Evit mirout na ve kamm-veizet ar ger "blotadur" pa ve arveret evit ar pezh a vezomp boaziet da ober "c'hwezhadur" anezhañ eo em eus savet ar ger "gwanadur" evit an anadenn a vez graet anezhi "Lenierung" en alamaneg ha "lenition" e saozneg.

6. DOAREOU AR C'HWEZHADUR ER YEZHOU PREDENEK

Gwellet hon eus splann enta e fazias an Ao. Falc'hun pa gomzas eus "kreffvadur" a-zivout anadenn ar c'hwezhadur brezhonek. Al lodenn-se eus e labour a ve da eilskriveañ penn-da-benn. Setu penaos e c'hoarvezas gwanadur ar c'hensonennoù gevellek amglev er predenegoù, hervez Martinet, ECL 267-68 : ur strollad [atta] a ya da [ata] ha neuze da [aθa]. Setu an daolenn a c'hellomp sevel :

[pp]	>	[p]	>	[p̄]	>	[f]	>	[ɸ]
[tt]	>	[t]	>	[t̄]	>	[s]	>	[z]
[kk]	>	[k]	>	[k̄]	>	[x]	>	[ç]
1		2		3		4		

Evit ar brezhoneg, evel a welomp, ez eus bet, abaoe prantad ar predeneg, tri pe bevar c'hemm :

- 1°- Ar gwanadur kensonenn c'hevellek > kensonenn c'hwezhet;
- 2°- Ar gwanadur kensonenn c'hwezhet > kensonenn c'hwezhet;
- 3°- Evit ar c'hensonennoù gweuz ha dent, ur c'hemm en urzh an distagadur, eleze, ar gensonenn c'hwezhet diweuz [ɸ] a ya da gensonenn c'hwezhet gweuz-dent; hag ar gensonenn c'hwezhet dent a ya da gensonenn logig-dent (c'hwibanus). An anadennoù 1° ha 2° a gaver ivez e kembraeg hag e kerneveg evit an teir c'hensonenn; an anadenn 3° ne c'hoarvez ar yezhoù-se nemet evit ar gensonenn weuz. N'eus 3° ebet e nep yezh predenek evit ar gensonenn ouelstaoc'h.

4°- E brezhoneg, ur gwanadur all, o lakaat ar c'hwezhen amglev da haglev, evel na vez anat diwar labourioù Falc'hun :

[f]/[ɸ] = 2,27 [s]/[z] = 2,78 [x]/[ç] = 2,73

N'eo ket bet peurgaset da benn e Breizh an anadenn ziwzehañ-mañ hag e kornioù zo e vez klevet [e f:n e sad e xaz]. E kembraeg hon eus, da geñver he fenn, he sad, he c'has, Kb. ei fen, ei thad, ei chath, eleze [i fen i θad i xaθ], hag e Kn. hy fen, hy thas, hy hath, met, evit ar c'herneveg ez eo diaes gouzout hag-eñ e veze an anadenn 4°. Bez'e hañval bezañ bet pa seller ouzh treuzskrivadurioù Ihwyd evit an diskar-gerneveg.

Ar pezh zo bet lavaret amañ uheloc'h a dal, evel reizh, evit ar c'hensonennoù gevellek amglev e kreiz ur ger e predeneg, sk. La. littera, Kb. llither, Kn. lyther, Br. lisher; Gn. -cotta, Kb. Kn. oeth, Br. kozh, h.a.

Un evezhiadenn a rin amañ c'hoazh : tra ma'z ae [θ] da [s] ha [z] e derou ur ger, e troe da [x] ha [ç] e-kreiz ur ger e gwehedege, hag ivez, pezh n'eo ket bet merzhet a-walc'h, e diskargerneveg (na oufe bezañ, padal, diskennad ar galianeg..). Met n'on ket evit lavarout hag-eñ ez eus amañ un anadenn

c'hoarvezet hep liamm e brezhoneg hag e kerneveg (an emdro [ç] > [x] a vez kavet e meur a yezh, en iwerzhoneg da skouer), pe e teufe eus un distagadur disheñvel abaoe ar predeneg.

7. AR C'HALETADUR

Mard eus ur c'hennadur dre greñvaat, a soñjfer, an hini "dre galetaat" eo : [b]/[p], [d]/[t], [g]/[k]. Hervez ! Anat eo pa seller hepken ouzh an distagur a-vremañ : buoc'h :: ho vuoc'h; dorn :: ho torn; gar :: ho kar; pe, e Kn. badhya :: ow badhya; degea :: ow tegea; gortos :: ow cortos. Met ret eo dere'hel soñj ez eo nevez a-walc'h un hevelep kennadur; Br. hc a veze krBr. hoz, ha Kn. ow = Br. o (rannig-verb) a zeu eus owth, Br. ouzh, eleze n'eo ket [d] a ya da [t], hogen [θd] > [dd] (dre hevelebekadur) > [t].

Dibaot e veze ar c'hensonennoù gevellek heglev er predeneg koshañ; ur skouer hon eus avat, da nebutañ, er ger Br. krediñ. En henindieg ez anavezzer grad-dadhāmi eleze, ger-ouzh-ger "e lakaat kredenn" > "e kredenn", hag ur ger damheñvel a ranker goulakaat evit diskleriañ ar c'heltieg, lakomp *kred-dimi. Ar strollad /dd/ a yeas da /t/ e predeneg a-rack eil hanterenn ar 5^t ktvd. peogwir e roas da c'houde /d/ : Kb. credu, Kn. crvsv, hBr. critim /kridiñ/ (An g [z] kernevek a zeu eus kemm un /d/ en 12^t ktvd, sl. Kn. tag = Br. tad, Kn. oos = Br. koad, h.a.). Un anadenñ heñvel a c'hoarvezas e-doug maread ar c'hrennvrezhoneg : [bb]/[p], [dd]/[t], [gg]/[k]. Jediañ a c'haller padelezh ar c'hensonennoù gevellek heglev :

[bb] # 15,07 cs [dd] # 16,65 cs [gg] # 14,89 cs,
gwerzhadoù brasoc'h eget re [p t k], bezet ar feuriadoù brasoc'h eget 1 :

[bb]/[p] # 1,61 [dd]/[t] # 1,51 [gg]/[k] # 1,43.

Lavarout a c'haller neuze : ur gwanadur eo ivez ar "c'hennadur dre galetaat".

Gwelet hon eus (§ 6) ez oa aet pp predenek da f, hogen bremañ pa gaver ur strollad /-p p-/ , eleze ur ger dibennet gant [p] dirak ur ger o kregiñ gant [p], n'eo ket ur c'hwezhadur a c'hoarvez hogen un eunadur, eleze ur gwanadur c'hoazh :

[pp]/[p] = [tt]/[t] = [kk]/[k] # 7/4 .

8. EVEZHIADENNOU

Evel hon eus lavaret, arabat e ve reiñ d'ar jedadurioù-se un dalvoudegezh re vras. Bezh a c'haller dezastum dioute zo ur vrasvent hepken, erit an abeg-mañ : ar sifroù zo bet tennet diouzh levr an Ao. Falc'hun. N'eus abeg ebet da lakaat un arvar bennak war wirionde e studi evit a seil ouzh e zistagadur, eleze, e tal ar gwerzhadoù-mañ evit taolenn teodvezh ur yezher desket eus ar Vourc'h-Wenn na reas met nemeur a arnodenn. A-rack sevel ur studiadenñ glok e veze ret :

1°- Arnodenniñ distagadur meur a zon eus Breizh hag eus Kembre hag o tont eus lec'hioù disheñvel eus Breizh ha Kembre hag o tibab evel a vez graet evit an holl studiadennoù soniadell sirius, eleze e-touez tud an nebutañ levezonet dre ar stummoù skrivet : evit hevelep enklaskoù ur wrac'h diseek krenn he deus kalz muic'h a dalvoudegezh eget ar skedusañ kelenner dre ma ro stummoù gwirion hep rakvarn lennegel pe vicherel : sellit ouzh a skriv Kenneth Jackson, ZCP 28 274, o tamall dibab ur skolaer gant an Dean Le Roux evit e Atlas Linguistique : "A type of person found notoriously unreliable by the Gaelic Survey because of their literary knowledge and pedantic tendencies, and hence never used as informants".

2°- Liesaat o arnodennoù; d'am soñj, evit ma vezo reizh an arnodenn ha ma c'hallimp diazezañ hor c'hellennadurezh war werzhadoù degemeradus e vezo ret kaout keitad un ugent fed, da nebutañ, evit pep anadenñ ha pep yezher. Pell emamp diouzh an dra-se.

3°- Prizius e ve gouzout ivez hag-eñ e chom e Kerne-Veur pe e Breizh-Uhel divrezhonekaet reodoù eus un distagadur o tennañ muic'h d'ar predenegoù eget d'ar saozneg pe d'ar galleg, pe, lavaret e mod all, gouzout pegeit e pad doareoù distagañ an hen yezh er yezh nevez : anat eo ne vez ket distaget ar galleg e Kemper, da skouer, gant ar c'hallegerien, ar re a-vihanik zoken, evel e Naoned. An arnodoniadoniezh a c'hallfe reiñ kentelioù prizius er c'heñver-se.

Hetus meurbet eo e vo adstudiet ar gudenn gant tud ampart war an arnodoniadoniezh, ken e Breizh, ken e Kembre. Labour ar skolioù-meur e ve. E Kembre e c'hellfe bezañ kavet tu d'e ober. E Breizh e c'hallfe ... rak an Ao. Falc'hun, hag eñ kelennet abaoe ugent vloaz pe dost, en deus, sur a-walc'h, stummet diskibion ampart ha niverus evel pep kelenner dellezek eus an anv kaer-mañ. Spi am eus, da nebutañ.

9. KLOZADUR

N'em eus graet met brasluniañ ar gudenn; ranket em bije komz ivez eus gwanadur kensonennoù all evel /r/, /l/, /n/, h.a.; ranket em bije ivez komz eus ar fedoù iwerzhonek hag i peuzheñvel. Kavout a ra din avat em eus diskouezet pegen arvarus, ha faos zoken, ez oa, diwar ur savboent treadegel, komz eus tri rummad kenmadurioù : dre vlotaat, dre c'hwezhañ, dre galetaat. Evit gwir n'eus nemet un anadenn, ha hi o c'hoari abaoe prantad ar predeneg, ha muioc'h zoken : ar gwanadur. Ar gentel a dennin eo homañ : war wanaat bepred ez a gremm distageñ ar c'hensonennoù er yezhoù keltiek, na pegen uhel e c'hellomp mont war-gil en amzer. Ha n'eus arcuez ebet ez afe war c'horrekaat. Keltiegerion ar bloaz 3000, mard eus c'hoazh, a gomzo sur a-walc'h ur yezh hogozik hep kensonenn evel a c'hoarvez bremañ gant yezhoù polinezek zo evel an tahi-tieg... Evit frealziñ ar vrogarourion, avat, e livirin e c'hoarvez un anadenn peuzheñvel en holl yezhoù romanek...

+ + + + +
+

Gwener 6 Eost 1965

SIMON BOLIVAR AL "Libertador"
gant
abEnnez

E-touesk tud veur ar bed e c'heller kavout skouerioù evidomp-ni, Breizhiz. Simon BOLIVAR "Libertador", Dieuber Amerika ar Su, en deus gouestlet e vuhez da Rezid e Vro ha zoken ar Broioù nesañ, o lakaat da wir komzoù Roparz Hemon : "Ho trec'h a vo hon trec'h". N'e gav ket din e ve anavezet kalz Simon BOLIVAR en Emsav Breizh : setu perak em eus dilennet komz amañ war e zivout.

Simon BOLIVAR a zo bet ganet e Caracas, d'ar pevare warn-ugent a viz Gouhere 1873. Mab e oa da Don Juan Vicente Bolivar ha da Dona Maria Conception Palacios y Sojo. Anvet e voe Simon evel e dad-you, bet eil gouarnour ar Venezuela e 1587. Ar re Volivar a oa tud a vonez, tud a noblañs mar kirit, eus ar Vizcaya. Gwezhall o devoa bet strivet evit Euskadi. Hogen na gradan ket e vijent bet chomet ken feal ha se d'o c'hanel. Kar e oant dre zimeziñ da bennoù uhel Navarra, Galisia, hag Andalousia deuet da annezñ ar Venezuela.

Tri bloaz e oa Simon BOLIVAR pa varvas e dad; nav bloaz pa varvas e vamm. Lakaet e voe da dad-gward dezhañ - ha da galenner war un dro - Don Jose Miguel Sanz, ur gwiraour e hil kastilhat.

Daofodù a gontar e-zivout bugaleaj Simon; na gradan e vije gwir kemant

tra-se, evel kement "ger istorel" a vez lakaet e genou tud veur an Hanez.

Difennet e veze ouzh Simon komz e-pad ar predoù. Alies e walle ar bugel lezenn e dad-gward :

- Goût 'ouzoec'h ez eo difennet ouzhoc'h digerifi ho kenou e-pad ar pred, eme henezh.

Ha setu, Simonig, kroaziet e zivrec'h, e zaulagad ouzh e asied, o chom hep debrifi. Da Don Jose, souzhet, ec'h eilgomz ar paotrig :

- Penaos e c'hellfen debrifi, pa lavarit din chom hep digerifi va genou ? Ar gwiraour a wel re vat ne hell ket dont a-benn da "zofivaat ebeulion", gouez dezhañ.

- Ur paotr leun a dan ez oc'h, emezañ d'e skoliad.

- Neuze, kit diouzhin, a eilgomz hemañ, anez e c'hellfen ho teviñ.

A-vec'h m'eo manet bloaz ar paotr yaouank e ser Don Jose Miguel Sanz. Fiziñ e voe, e deroù 1793, en ur c'helenner all, Simon Rodriguez. Ur paotr, hemañ, kontrol da Jose Miguel, diskibl da Rousseau, a laka da ziwan e spered ar paotrig mennoziou ar brederourion c'hall ha resped an Dispac'h.

E 1799, setu Simon BOLIVAR o vont da beurober e studioù e Bro-Spagn. Aze, e ti Markiz Uztariz, e ra anaoudegezh gant ur plac'h yaouank, "kufiv ha kenedek", Tereza del Toro, hag e kouezh en he c'harantez. Tad ar plac'h Don Bernardo Rodriguez, markiz del Toro, ne fell ket dezhañ avat reiñ e verc'h d'ur paotr ken yaouank, a-boan 17 vloaz.

- Beajit, gweladennit Europa, ha distrait a-benn daou vloaz emañ, emezañ, neuze e vo gwelet. Ne oa ket ar Markiz evit krediñ e vije distroet ar paotr.

Simon, glozet e galon, a zeu neuze war e studi e Skol Politeknik Bro-C'hall. Daou vloaz goude, deiz evit deiz, e tistro dirak Markiz del Toro :

- Ne fell ket din gortoz, emezañ, goût 'ouzoec'h petra on deuet da c'houlenn ouzhoc'h.

Ne hell ar Markiz nemet dere'hel d'e c'her o walout kalonegezh ar paotr. Euredet e voe Simon ha Tereza e miz Mae 1802. Diouzhtu e kemeront al lestr d'ar Venezuela. Siwazh, mervel a ra Tereza, un nebeut mizioù diwezhatoc'h, gant ur wall-darzhenn, d'an eil warn-ugent a viz Genver 1803.

Darev eo neuze, Simon BOLIVAR, d'am reiñ, korf hag ene, d'e vro. Diauber e vezo dre garantez. War bez e wellañ karet, en deus touet ne garfa ken macuez ebet ha dere'hel a ray d'e c'her.

Distreiñ a ra ul lazadig e Paris. Eno e ra anaoudegezh gant an Ac. de Humboldt, an douaroniour, war e zistro eus Amerika ar Su.

- Me 'gav din, emezañ da Volivar, eo darev ho pro da dapout ha Rezid... met piv a vo gouest da seveniñ hevelep labour.

Ne wel ket an douaroniour emañ an den-se dirazañ. Simon BOLIVAR zo ezel eus "Rinva Meur Amerika". Eno en deus graet al le-mañ : "Ober a rin kement a c'hellin a-benn diazezañ ar Republik, evel an doare-renerezh a zere ar gwellañ ouzh broioù Amerika". Klask a ra ur skoazell bennak. Da gentañ en deus soñjet e Buonaparte. Hogen "emañ Buonaparte o tont da Napoleon !" Republikan eo Simon : edo e Paris da gefiver kurunadur Napoleon ha nac'het en deus mont d'ar gouel o lavarout : "evidon n'eo ket un deiz gouel, un deiz-kafiv ne lavaran ket".

Goude en devout gweladennet Bro-C'hall, Italia, Alamagn, ar Stadoù-Unanet, e tistro d'ar Venezuela da heul darvoudoù Bro-Spagn. D'an 19 Meurzh 1807, en deus Charlez IV dilezet e dro evit mad d'e vab. D'an 23 emañ luioù Bro-C'hall e Madrid.

E Caracas, Simon BOLIVAR hag e genstourmerion a gav dezha eo deuet ar mare d'em sevel. P'eo lakaet Lusian Buonaparte da roue Bro-Spagn, emañ BOLIVAR a-touesk ar re gentañ, o savet ouzh e branestr banniel ar Venezuela a grouez : "parkeier our Amerika, disrannet gant glazur ar Meurvor, diouzh ar Spagn gwadek" (Tirannet en aour, glazur ha gul).

D'an 19 Ebrel 1810, kannad roue Bro-Spagn, a vez digarget hag en e lec'h e vez savet ur "C'huzul-Meur da virout gwirioù Ferdinand VII". Un touell n'eo ken.

D'an 21 a viz Kerzu 1811, e vez diazezet al Lezenn-Stad.

D'ar 15 a viz Genver 1812, e vez diskleriet ar Rezid ha savet ar Republik. N'eus ket bet skuilhet ar gwad betek-henn : "un dispac'h en peoc'h ez eo bet". Mat n'eo ket echu an traoù. BOLIVAR henn goar orvat, pa lavar d'ar C'hendalc'h :

- Arabat diekaat, bremañ : n'eo ket ar Spagnoled hon eus da ziwalloute, hogen Venezueliz a gev dezhe ez eo o dlead hag o mad menel diouzh tu Bro-Spagn. Krog eo dija ar brezel etre ar "rouealerion" hag ar "vroadelourion".

D'ar 26 Meurzh 1812, Yaou Gamblid, leun-chouk eo an ilizoù evit trugar-ekaat an Aotrou Doue da vezañ roet he rezid d'ar Vro. Ha setu ur c'hren-douar o wastañ kêr g'Caracas : dindan disantroù an ilizoù e kaver 4 000 den marv. Talvezout a ra kement-se d'ar "rouealerion" : prest eo ar bobl da gredañ ez eo un diougan a-berzh Doue. Setu dres pezh a lavar ar venec'h :

- Nac'hit ar Republik fall-se ! N'hellit netra enep an natur.

Emañ BOLIVAR e kêr oc'h obar war-dro ar re c'hleazet; o klevout ur manac'h o prezeg evel-henn e tap krog ennañ o lavarout :

-M'emañ an natur enep deomp, e stourmimp outi hag en he zrac'himp !

E-keit-se, emañ soudarded Bro-Spagn, renet gant ar general Monteverde o tont davet Caracas. Sezizet o deus bet endev Carora, Barquisimeto, San Carlos, Valencia, Puerto-Cabello... D'an 29 Gouhere 1812, ez eo kemeret Caracas "En anv e Veurdez Katolik-Meurbet".

Parev eo Republik Kentañ ar Venezuela : padet ha deus bet 6 miz.

BOLIVAR zo war dec'h. Aet eo da g'Cartagen, kêrbenn Granada-Navoz, un drevadenn spagnat all, savet da Republik dieub a-gevret gant ar Venezuela. Goulenn a ra BOLIVAR tud ouzh Kendalc'h ar vro-se evit dieubiñ e vro dezhañ. Ne hell kavout nemet daou gant den ha neozh gante e tale'ho d'e le : dieubiñ ar Venezuela goude 7 miz hanter brezel.

Treuzwisket, BOLIVAR hag e zaou gant den a loc'h diouzh Cartagen war vagoù o zoennoù soul, d'an 22 Kerzu 1812. Dre un taol dic'hortoz e sezizent

Tenerife, ul lec'h-kreñv e-us da stêr ar Magdalena ha difennet gant 500 den. Goude-se, e kemeront, lezerc'h-ouzh-lezerc'h Mompox, Guamal, Banco, Penon, Tamalomeque, Puerto-Real hag Ocana.

Goude en devout tremenet an Andoù, trec'het ar Spagnoled e Cucuta, e tegouezh BOLIVAR ar Venezuela d'ar c'hentañ a viz Meurzh 1813. Hironed a zeu en e lu. A-benn an diwezh, setu eñ e Caracas d'ar 6 Eost 1813, moulet gant 30 000 den. Kuzul an ti-kêr a ra dezhañ an anv a "Libertador". Goulennet e vez outañ kemer pep galloud, ken soudardel ken stadel. Nac'hañ e ra da gantañ, o lavarout :

- Kaout an dreist-beli ken c'hoantaet gant mac'herion ar c'hevandir all, e vije evidon, a gar ar Rezid, an dra kasusañ ha ponnasañ a c'hallfe bezañ. A-walc'h eo din bezañ al "Libertador". Hogen setu an enebour o sevel adarre. Sezizet eo rannvroioù ar Gwiana ha Maracaibo. An holl dud a c'houlenn outañ kemer penn ar stourm ha penn ar stad. Rankout a ra esantiñ d'an diwezh. Diktator e vezo, daoust d'e c'hoant.

E traoniann Aragna, nepell diouzh e hacienda "an Ingenio", en em gann ouzh lu Bro-Spagn, renet gant Bowes. Duzh 7 000 den Bowes, n'en deus BOLIVAR nemet 1 200 troadeg ha 600 marc'heg.

Trec'het eo eilerion Volivar, Urdaneta ha Marino. 20 deiz e pado ar gad. Parev eo eil Republik ar Venezuela.

D'an 8 Gwengolo 1814, e kemer BOLIVAR ur wezh all hent an harlu. Setu eñ adarre e Granada-Nevez. Aze, gant un nabeut soudarded e tieub kêr Bogota, e zeu da vezañ kêrbenn nevez ar vro.

- Bremañ m'hoc'h eus ur gêrbenn nevez, roit ivez un anv nevez d'ho pro, eme Volivar; an hini kozh a zegas koun eus ar Spagnoled. Mat e ve deoc'h hec'h envel diouzh anv Kristofer Kolombus ?"

Setu penaos e teu Granada-Nevez da vezañ Kolombia.

Gant skoazell arc'hant un hollandad, Loeiz Brion, o c'hom e Curaçao, e c'hell BOLIVAR sevel ul lu nevez ha dieubiñ adarre a vro. Tri vloaz e pado

an emgannoù. E 1819, ar Venezuela zo dieub da vikan.

Hogen n'eo ket echu stoum Simon BOLIVAR. Goude Kolombia, goude e vro, setu-ññ o stoum evit Peru, bapred dindan veli ar Spagnoled.

E 1826, setu Peru dieubet ivez. Kendalc'h ar Vro a laka BOLIVAR da brezidant ar Republik nevez. Nac'hañ a ra, hogen ar C'hendalc'h ne fell ket dezhañ distreiñ war e zizentez.

Prezident e vo eus teir bro war un dro, tra rouez en Istor, rak lodenn uhel ar Peru, disheñvel e-keñver gouann ha douaroniezh, zo em savet da Republik dieub ha kemeret he deus da anv Bolivia evit dougen bri da vikan da Simon BOLIVAR.

Siwazh, ne oa ket dave ar "broioù ladinat" d'en em ren. Abaoe BOLIVAR ez eus bet diassterioù e-leizh enna. BOLIVAR henn gouie arvat, hogen ne felle ket dezhañ bezañ "Napoleon Amerika".

- Ne fell ket din tremen da vac'her. Me 'gav din n'eus nemet un diktatoriezh a c'hellfe selvel Amerika ar Su, hogen an diktatoriezh zo skoilh ar Republik.

Marvel a ray BOLIVAR d'ar 17 Kerzu 1830, goude bezañ bet digarget.

"Dieuber dre garantez, karour ar Republik, den eun hag uvel, n'en devezo ket gallet selvel Su-Amerika, hogen menel a ray al "Libertador" hag ur skouer evit an holl vroioù mac'het."

26.06.65

+ + + + +

+

Sadorn 7 Eost 1965

W A R H E N T O U A N A R D A M E Z O U R I E Z H

g a r t

a b E n n e z

Goude hor bout savet ur c'heriaoueg a'n Ardamezouriezh⁽¹⁾, e van deomp - ha d'an holl dud dedennet gant ar skiant-mañ - he lakaat da dalvezout⁽²⁾. Setu perak - ha da c'hortoz ma vo embannet levrennoù arall gant "GWENEDOUR" ha savet ur Strollad Ardamezouriel Brezhon⁽³⁾ - e kredan kinnig an notennoù-mañ.

I.- An ARDAMEZOURIEZH.

An Ardamezouriezh eo an Arz hag ar Cuezoniezh a ro deomp da c'houzout kement tra a-zivout an arouezioù - graet oute ardamezioù - a c'hoarvez eus livioù ha lunioù; gouzout displegañ en un doare resis ha reizh ardamezioù an dud; gouzout kenaozañ ardamezioù nevez diouzh ar reizhennoù boas.

SKOEDOURIEZH ez eus bet graet ivez ouzh an arz-mañ dre ma veze livet gwezharall an ardamezioù war ar skoedoù-brezel.

(1) DAFAR EVIT UR C'HERIAOUEG A'N ARDAMEZOURIEZH, gant Yellen hag abEnnez (GWENEDOUR, niv. 18-19, H. Hillion, Arzhon (56).

(2) Un doarnlevr da zeskñ Ardamezouriezh a vo moarvat ar c'hentañ tra da embann. Ret e vefe ivez - o lakaat an Arz-mañ da dalvezout evit an Hanez - treiñ e brezhoneg levr POL POTIER DE COURCY : "Nobiliaire et Armorial de Bretagne" ('Bonezlevr hag Ardamezeg Vreizh).

(3) Kement den dedennet gant an Ardamezouriezh a ve mat dezhañ skrivañ deomp e ti GWENEDOUR, c/o H. Hillion, Arzhon (56).

Miret ez eus bet betek ennomp ar boaz da dresañ an ardamezioù war ul lun dezhañ neuz ur skoed : a anver ez-reizh SKOEDLUN, HARODIEZH a veze lavaret ivez o kounaat e veze embannet gant an Haroded ardamezioù an dud a vonez (= a noblañs) kent d'ar re-mañ monct war al les-emgann.

E yezhoù zo e vez graet ivez BIAZON ouzh an Arz-mañ.

II.- Ar SKOEDLUNIOÙ.

Meur a stumm zo bet roet d'ar skoedlunioù, reoù zo pell diouzh ar skoed-emgann⁽⁴⁾.

Ar skoedlun anvet 'kozh' zo dezhañ stumm un tric'horn keitgarek, hantergrommek e duioù kevatal.

Ar skoedlun anvet 'nevez' zo dezhañ stumm un hirgarrez, beget gant ur wareg damblaen.

Anaout a reer ivez 'Skoedlun an Dimezellet', dezhañ stumm ul lankell⁽⁵⁾ - hag hini an Itronezed, dezhañ stumm un hirgelo'h. Ar skoedlun aesañ da dresañ, nebeut arveret en hon grez, zo hini an 'toumnamantou', dezhañ stumm ur c'harrez. Graet ez eus bet ivez gant skoedlunioù arall, evel an TARSKOED, dezhañ un tarzha war e du dehou. Hemañ zo bet boaziet dreist-holl e Bro-Alamagn.

An Arabed o deus ivez skoedlunioù krenn- pe graoñheffvel.

III.- Al LIVIOÙ arveret en ardamezouriezh.

Feurliesañ ez arouezier al livioù ardamezel gant pikoù ha linennoù. A-hend-all en o liver gant o liv gwir a venegomp amañ etre krommelloù.

1/ ar METALIOÙ, anezhe :

- an AOUR (melen), deluniet gant pikoù;
- an ARGANT (gwenn), deluniet hep pik na linenn;

2/ ar PRIGWER, anezhe :

- ar GUL (ruz), deluniet gant linennoù a-zrec'h;
- ar GLAZUR (glas), deluniet gant linennoù a-zremm;
- ar GBOTRED (gwer), deluniet gant linennoù a-veskell

(4) Setu perak e ranker diforc'hañ ar skoed-emgann diouzh ar skoed ardamezel oc'h ober ouzh hemañ diwezhañ "skoedlun".

(5) Lankell : Sn. losange - Gl. losange. Merzhit avat a reer gant "talbennan" en Ardamezouriezh ouzh al lun-mañ.

a-zehou ar skoedlun⁽⁶⁾ da gleiz eus ur c'horn d'egile;

- al LIMESTRA, deluniet kontrol d'ar geeted, gant linennoù a-veskell a-gleiz da zehou;
- ar SABEL (anezhañ ur feur evit gwir), deluniet gant linennoù a-groaz;
- an AOURAVAL (liv ar frouezh-se), deluniet gant linennoù a-zerc'h kroaziet gant linennoù a-veskell a gleiz da zehou, da lavarout eo evel ar gul hag al limestra kemmesket;

3/ ar FEURIOÙ, anezhe :

- an ERMINIG hag ar GINERMINIG,
- ar BRIZH hag ar GINVRIZH, deluniet gant o livioù dezhe.
- an ERMINIG a c'hoarvez en argant evit ar maez hag en sabel evit ar brizhennoù. Liv al loen 'erminigenn'⁽⁷⁾ an hini eo;
- ar GINERMINIG a c'hoarvez en sabel evit ar maez hag en argant evit ar brizhennoù, eleze a-c'hin da livioù an erminig;
- ar BRIZH a c'hoarvez en argant ha glazur;
- ar GINVRIZH en glazur hag argant.

Pa ne vez ket d'an erminig ha d'ar brizh o livioù dioute o unan, e ranker lavarout 'ERMINIGET (en)' pe 'BRIZHET (en)' hag envel da heul al livioù arveret.

IV.- An DASPARCHAN.

Bez' ez eus ouzh ar skoedlun 9 lec'hied pe DREMMAD; henn eo al lec'hioù ma c'hell bout lakaet al lunioù pe TRAOLIOÙ.

Lennet e vez ar skoedlun evel penn un den, eleze evel pa vije douget gant ur marc'heg. Setu perak emañ DEHOU ar skoedlun a gleiz evidomp ha KLEIZ ar skoedlun a zehou evidomp. Kreiz ar skoedlun eo ar c'h-KONDON. Trederam uhelañ ar skoedlun eo ar c'hKAB ha trederam izelañ ar skoedlun eo ar BEG. Pep tu a vez anvet LEZ.

Rouez eo gwelout ur skoedlun gant ul liv hepken (Ardamez Breizh : en erminig leun). Feurliesañ e vez dasparzhet ar skoedlun).

Al lodennoù pennañ zo :

- RANNET, pa vez dasparzhet ar skoedlun gant ul linenn a-zerc'h;

(6) Kv. § IV, evit anvadur 'kleiz' ha 'dehou'.

(7) Reizhañ war hon DAFAR : ERMINIGENN b., gl. "hermine" (loen); KAERELL b., gl. "belatte" (ha skubañ *buan kuit !)

- TROC'HET, pa vez dasparzhet ar skoedlun gant ul linenn a-zremm;
- BENET, pa vez dasparzhet ar skoedlun gant ul linenn a-veskell eus korn dehou ar c'hab da gorn kleiz ar beg;
- SKEJET, pa vez dasparzhet ar skoedlun gant ul linenn a-veskell eus korn kleiz ar c'hab da gorn dehou ar beg, eleze kontrol d'an hini "benet".

Oc'h ober diouzh rannet ha troc'het, e savomp ar PALEFARZHET, da lavarout eo e tasparzhomp ar skoedlun e peder lodenn garrezek ha kevatal.

Oc'h ober gant ar pevar dasparzhadur, e savomp ar BARLENNET, da lavarout eo e tasparzhomp ar skoedlun e eizh tric'horn kevatal, o tegas koun da askelloù ur vilin.

Pep palefarzh a c'hell bezañ ivez rannet, troc'het, benet pe skejet d'e dro. Lavarout a reer en degouezhioù-mañ : ADRANNET, ADTROC'HET, ADVENET, ADSKEJET. Bez' e c'hell ivez bezañ ADPALEFARZHET.

Aslodennet e c'hell bezañ ar skoedlun e meur a zoare. Sed amañ ar re bennañ :

- diouzh PEUL pe PEULLIAOUBT, eleze aslodennet evel pa vez "rannet gant linennoù a-zerc'h;
- diouzh TREUSTELL pe TRUSTELLAOUBT : eleze aslodennet evel pa vez "troc'het", gant linennoù a-zremm;
- diouzh SOURIN pe SCURINAOUBT : eleze aslodennet evel pa vez "benet" gant linennoù a-veskell a zehou da gleiz;
- diouzh GWIFRELL pe GWIFRELLAOUBT : eleze aslodennet evel pa vez "skejet", gant linennoù a-veskell a gleiz da zehou.

Pa vez dasparzhet ar skoedlun e teir lodenn, e vez lavaret TREDEET (diouzh peul, diouzh treustell, diouzh sourin, diouzh gwifrell...)

O tegas tric'hornioù ouzh ar skoedlun, hon eus aslodennoù arall :

- KABELLET, pa vez savet div linenn a-veskell eus kreiz bevann ar c'hab da bep korn eus ar beg;
- LAVREGET, pa vez savet div linenn a-veskell eus kreiz bevann ar beg da bep korn eus ar c'hab, eleze kontrol d'an hini "kabellet";
- BRIATAET ouzh KLEIZ, pa vez savet div linenn eus kreiz bevann an tu kleiz da bep korn an tu dehou;
- BRIATAET ouzh DEHOU, pa vez savet div linenn eus kreiz bevann an tu dehou da bep korn an tu kleiz, eleze kontrol da "briataet ouzh kleiz";

- GWISKET, pa vez savet ur wargarrezenn gant linennoù o tont eus kreiz pep bevann eus ar skoedlun hag o lezel evel-se pevar tric'horn kevatal ouzh kornioù ar skoedlun;
- MILGINET, pa vez savet ur W e doare pe zoare war ar skoedlun.

Oc'h ober gant linennoù kromm, hon eus aslodennoù arall :

- LEZIET, pa vez savet ul linenn gromm, eus un tu d'ar skoedlun, eus ur c'horn d'egile;
- ENEZENNET, pa vez savet un doare kranell ouzh unan eus al lodennoù;

Oc'h ober diouzh "tredeet diouzh peul" ha "tredeet diouzh treustell" e savomp war ar skoedlun 9 lodenn garrezek ha kevatal a vez graet oute DREMMADOU KEVATALET : peurliesañ e vez 5 dremmad en ul liv kevatalet gant 4 en ul liv arall.

Menegiñ a c'heller bremañ un nebeut GOULODENNOU pe "lodeanoù bihan" :

- GWEZBOELLET, pa vez dasparzhet ar skoedlun en un niver resis a garrezioù bihan, pebeilet o liv, ha renket evel karrezioù ur c'hoari gwezboell, ur c'hoari echedoù pe ur c'hoari damez. Graet e vez REZENN ouzh pep lodenn a-zremm savet war ar skoedlun pa vez hemañ gwezboellet. Al lodennoù a-zerc'h a reer oute DREMMADOU. En doare-mañ, e ranker delenn ur skoedlun GWEZBOELLET : "Gwezboellet en (argant ha glazur) e (deir) rezenn eus (pevar)". Ne dalv ket ar boan menegiñ ar ger "dremmad" en diwez : isklevet e vez, pa n'eus arvar ebet(2).
- TALBENNANET, pa vez dasparzhet ar skoedlun, evel pa vez gwezboellet, hogen gant karrezioù gwariet, stouet e-lec'h karrezioù boutin;
- GWERZHIDET, pa vez savet gwargarrezioù brasoc'h war ar skoedlun.

Pep linenn a c'hell bezañ estr eget eun. Bez' e c'hell bezañ :

- KOMMEK, evel ul linenn savet gant un dorn krenidik;
- HURENNEK, gant dantoù bras ha kommek;
- KONCHEK, un tamm evel skant ur pesk;
- GARZBENNEK, gant dantoù bihan, evel re un heakenn;
- DENTEK, gant dantoù brasoc'h;

(2) E galleg e lakaer peurliesañ ar gerioù "pièce" (pezh) ha "point". E saozneg ne lakaer neprad. Eunnoc'h eo eta e brezhoneg tremen hep ar gerioù-se, pa n'eus arvar ebet.

- GOURDENTEK, gant dantoù bras-tre;
- KRANELLEK : e daou zoare : BEUNGRANELLEK, o tegas koun eus kranelloù ar c'hestell-kreñv; pe TREUZKRANELLEK pa vezont stouet.

V. - AR C'HARGOU

Goude hor bout dasparzhet ar skoedlun, e c'hellomp e gargañ gant pep doare lunoù. Amañ ne rimp met braswelout ar c'hargoù.

a) Ar pezhioù briel : zo peurliesañ stok ouzh bevenn ar skoedlun : o vezañ ma vez dasparzhet ar skoedlun e 8 bann sav ha 7 bann led, ez eus 2 vann led d'ar pezhioù.

Ar c'hKAB hag an TOSTAL zo lec'hiet a bep eil e penn uhel-añ hag e penn izelañ ar skoedlun - al LEZIOU dehou ha kleiz a bep tu - ar PEUL a-zerc'h e kreiz ar skoedlun - an dTREUSTELL a-zremm e kreiz - ar SOURIN a-veskell eus korn dehou ar c'hab da gorn kleiz ar beg - ar GWIERELL a-veskell eus korn kleiz ar c'hab da gorn dehou ar beg.

Al LAMMELL a c'heller sellout outi evel ur pezh briel savet diwar ar sourin hag ar wifrell gedarveret. Bez' ez eus ul lun e stumm ur Y a reer outañ KEMBAR - pa vez leun penn ar c'hembar hon eus ur gKORNIELL.

Ar PALBEARZH zo kard ar skoedlun. Ar c'hKONK zo ur palefarzh bihanaet. Ar SKOUERELL zo ur vevennad d'ar palefarzh (pe ouzh ar c'honk).

Ar vBEVENN a ra tro ar skoedlun, he led o vezañ ur seizh-vedenn eus hemañ. Ar GOUREM zo ur vevenn diabarzh.

E-touesk ar pezhioù briel e ranker ivez ar C'HROAZIOU : ur roll (berr) anezhe a vo kavet en "DAFAR".

b) An TRAOLIOU pe traozoù zo anezhe "pezhioù divriell" a c'heller kemm o lec'h war ar skoedlun : pezhioù bihan int.

Pa vez un traol hepken, e vez lakaet e kreiz ar skoedlun; pa ne vez ket e kreiz e ranker spislavarout e lec'hiadur. Pa vez meur a hini, e ranker menegiñ an niver, p'e c'houser. Alies ne dal ket an niver : lavarout a c'heller neuze ez eo an trao-lioù "diniver" : e brezhoneg avat e vez a-walc'h ober gant "lies" hep menegiñ "diniver" (da skouer : "lies steredenn").

k) Al LUNIOU : ar ger-mañ a dal dreist-holl evit ar pezhioù

n'int na "pezhioù briel" na "traolioù". Al lunoù zo an holl draoù a c'heller c'hoantsat lakaat war ur skoedlun, adalek pennzelvennoù ar Grennamzer betek ar fuzeennoù nevez. Menegiñ a c'hellomp evelkent un nebeut lunoù boas en Ardamezerezh : an den (penn, kalon, brec'h...), al loened (ardamezel-rik, peogwir ne vezont ket treset evel ma vezont en natur⁽¹⁾), ar bleuv (arzelaet ivez...⁽²⁾), ar gwez, ar frouezh, ar delioù...

EVIT KLOZAÑ

Pell e c'hellfemp komz c'hoazh a-zivout an Ardamezouriezh, ken ec'hon m'emañ he zachenn. Spi hon eus da c'hellout embann c'hoazh meur a dra war he divout, un dornlevr pa ne ve ken evit ar re a venno pleustrif he hentoù.

++++++
+++
+

(1) Setu perak n'eo ket ret ober gant gerioù lennegal na gerioù eus ar yezh voutin. Neozh e kav deomp hon eus degaset gerioù a-bouez evit ar yezh voutin, evel keurvil, gl. "éléphant" diforc'h dicuzh olifant, gl. "ivoire".

(2) Neuze pe laz e trofe "BOZENN" ar galleg "marguerite" pa n'eo nag ur "vozenn" nag ur "marguerite", hogen ur vleufvenn arzelaet o tennañ d'an div vleufvenn naturel-se.

Gwener 13 Fost 1965

A R G R I S T E N I E Z H K E L T I E K
g a n t
O l i v i e r L o y e r

E gwirionez an titl a roan amañ d'am prezegenn a zo faos. Ar ger kristeniezh n'eo ket an hini reishañ evit an darvez emañ o vont da gomz ouzhoc'h diwar e benn. Komz diwar-benn ar Gristeniezh Keltiek a vije komz diwar-benn un doare keltiek da vezañ kristen kenkouls en hon amzer-ni hag en amzer dremenet. Danvez relijiel pe zoueoniel e vije, tra ma'z eo istorel ha netra ken test va labour. Fellout a rafe din amañ studiañ ar stumm dibar he deus kemeret ar Gristeniezh er broioù keltiek etre ar Vvet hag an XIIvet kantved, lakaomp araok ar Grennamzer. Stumm ken dibar ma n'he deus ket asantet Roma dezhañ ha m'he deus stourmet didruez outañ ken e voe distrujet a-benn ar fin. "Les Chrétientés celtiques" e vez graet diouz ar stumm-se e galleg, ha mat ar ger. Met penaos e dreñ ? Kristenved keltiek a zo re ledan, hon darvez n'eo ket ar bed kristen. Iliz keltiek a vefe gwelloc'h marteze petra bennak ma'z eo re strizh ha touellus. Re strizh : n'emaon ket o vont da bleustriñ gant urzhiadur pe liderezh un iliz hepken. Touellus : d'am menec n'eus ket bet a Iliz keltiek gwirion ma vez intentet dre se ur c'horf kreizennet hag urvan, gant senedoù bodet ingal ha gant ur penna, ur seurt patriarc'h. Ur ger lies, evel e galleg, Kristeniezhon pe Kristenelezhioù e Keltia, a vefe marteze an droidigezh wellañ.

Olivier Loyer

Danvez diaes ma'z eus unan. Kalz a zo bet skrivet diwar-nezhañ, alies faltazioù siwazh. Rak nebeut a vammennoù hon eus, nebeut a destennoù kempred gant an degouezhioù, hag ar re hon eus n'int ket testennoù istorel, diavañ ma'z eo an Istor hag ar spered istorel en amzer-se, met skridoù-daেলাñ pe skridoù-meulñ pe c'hoazh skridoù skouerius, berr-ha-berr skridoù distreset. Hor mammenñ wellañ eo Istor Iliz ar broadoù saoz, Historia ecclesiastica gentis Anglorum, un istor skrivet gant Beda, ur bened saoz, er VIIIvet kantved, da glod e vroad hag Iliz Roma, da lavarout eo da glod enebourion ar Gelted hag an Iliz keltiek.

Met n'eo ket hepken an istorourion gosh o deus ur rakvarm bennak war an Iliz keltiek pa skrivont warnezhi. Ma n'eo ket skridoù-daেলাñ pe skridoù-meulñ levrioù kalz istorourion hon amzer, skridoù tuet d'an dezenn-mañ-tezenn ez int evit abegoù ha n'int ket skiantel, pell ac'hano. Diaes, dic'hallus marteze en em zieubiñ eus rakvarmoù relijiel, gouennel pe bolitikel pa stager gant seurt danvez. Rakvarmoù relijiel da skouer : istorourion protestant Breizh-Veur o deus, e-doug an XIXvet kantved, klasket diskouez ne oa an Iliz keltiek nemet ur rakstumm pe rakskeudenn eus an Disivoud. N'eus istorour siriüs ebet bremañ, na pa vefe protestant, o tere'hel da seurt mennoz. Ur striv e oa da reiñ da Brotestantiezh Breizh-Veur gwriziennoù en hengoun relijiel ar vro. Rakvarmoù gouennel pe bolitikel : evit istorourion Bro-C'hall pe Velgia, sklaer eo ne c'hell netra vat dont eus ar Gelted. "Lux ex Gallia aut ex Roma", evel a ouezit. Didalvoud e ve reiñ deoc'h skouerioù. Met arabat disoñjal ez omp tuet ni da rakvarmoù ken dibocell. Ma'z eo marv mik ar Geltomania war dachenn ar yezhoniezh gant ar yezhonourion desket bras hon eus en hon touez, bev c'hoazh eo hi e skiant an Istor.

Digarezit an evezhiadennoù hir-se arak kregiñ gant an danvez. Va dezo ne oa nemet lakaat sklaer dirazoc'h an disester anezhañ evit ma n'eo ket da lonkañ evel gwir bater ar pezh emañ o vont da zibunañ deoc'h. Ne ouien netra, koulz lavaret, tri bloaz 'zo, war an Iliz keltiek pa voe gouennet ouzhin gant an Ae. Dumézil, kelenner er Collège de France war Istor ar relijionoù indez europek, skrivañ ul levr diwar se evit ar Presses Universitaires. Prest al levr abaoe tost da zacu vloaz, e teuo er-maez e miz gwengolo⁽¹⁾. Ret eo bet din

(1) O. LOYER, Les Chrétientés Celtiques, Collection "Mythes et Religions", P.U.F., 1965.

ober buan eta; met amzer a-walc'h an eus bet koulskoude evit muzuliañ ec'honder an danvez ha donder va diouiziegezh.

Met trawalc'h a istor prevez. Krogomp gant hini an Iliz keltiek.

o o o

Pezh a ziskulias d'ar bed kristen e oa en Inizi Breizh-Veur un doare Iliz diforc'h diouz hini Roma e voe donedigezh Sant Aogustin e Bro-Saoz (Sant Aogustin Canterbury ha n'eo ket Sant Aogustin Hippone, Tad an Iliz). E 597, ar Pab Gregor Veur, a oa e vennañ treiñ d'ar C'hrist ar pobladoù german, a gasas Aogustin, ur bened italian, gant ur bagad menec'h da brezeg an Aviel da greisteiz Bro-Saoz. Ret en devon dezhañ beli n'eo ket hepken war ar Saozon a c'hellfe gounit d'ar feiz, met ivez war ar Gelted, a oa kristen abaoe pell. Bez' e voe neuze un emweladenn etre Aogustin ha pennoù relijiel ar Gelted e-kichen ar gêr a zo bremañ Bristol hec'h anv. Goulenn a reas Aogustin outo dilezel darn eus o c'hustumoù kontrol da re Roma, dreist-holl o doare da spisaat an deiziad resis eus gouelioù Paak, hag ivez asantiñ d'e veli. Ar Gelted a nac'has groñs. Kement-se a voe derou ur rendael hir ha kria.

Un ugent bloavezh bennak diwezhatoc'h emañ an tabut oc'h ober e reuz e Bro-C'hall ivez abalamour d'ar manac'h iwerzhonat Kolomban, en deus kuitaet e vanati a vBangor gant ur bagad menec'h, douaret e-kichen Sant-Malo pe e-kichen rikloù ar Seine ha krouet e Luxeuil, Fontaine hag Annegray manatioù bras e-lec'h m'eo bet miret an doare keltiek da zeiziadañ gouelioù Paak. Seul washoc'h an tabut ma'z eo deut Kolomban da vesañ unan eus pennoù bras Iliz Bro-C'hall, Iliz ar C'hornog zoken. Ha Kolomban da skrivañ d'ar Pab lizheroù doujus met reut da zisklaeriañ krenn ha krak e oa hengounel doare deiziadañ ar Gelted ha disivoudel hini ar C'hevandir. Ne voe dibenn d'an dael nemet 50 vloaz bennak, diwezhatoc'h pa voe dalc'het e hanternoz Bro-Saoz, e Whitby, dirak roue Northumbria, ur guzuliadeg pe sened brudet e-lec'h ma teuas Colman, abad Lindisfarne ha manac'h iwerzhonat, ha Wilfrid, abad Ripon ha bened : mont a reas ar maout gant ar bened (664).

Setu ur c'hrennadur eus an tabut evel ma c'hellit e lenn e n'eus forzh peseurt Istor an Iliz. Met ur seurt krennadur ne c'hell nemet reiñ deoc'h ur mennoz faos pe zister neurbet eus pezh a oa an Iliz keltiek.

Bez' e oa e gwirionez tri tabut pe dri abeg d'an tabut ha n'eo ket unan hepken, daoust d'an abegoù-se bezañ mesket ken e oant droukvesket (hag ez int c'hoazh droukvesket gant istor-curion 'zo).

Un tabut war al liderezh : amañ, poent bras an dael e oa deiziad gouelioù Pask, evel hon eus gwelet. Re luziet ar poent evit ma komzin diwarnezhañ; ha d'am menno ne oa ket aze edo an dalc'h, daoust ma hafvale d'an holl e oa.

Un tabut a-zivout urzhiadur an Iliz. Setu ar poent a c'houlennan ouzhec'h kaout koun anezhañ. Daou seurt Iliz a oa oc'h enebiañ, un Iliz vanac'hel hag un Iliz eskobel. Iliz ar Gelted a oa manac'hel, da lavarout eo, en devoa kemeret ar manati lec'h an eskopti. Ne lavaran ket ne oa ket a eskibion er broioù keltiek, met n'o devoa nemet ur garg liderezhel, dalc'het ganto o galloud sakr met kollet o beli. Ar beli a oa e dalc'h an abad. Alies e veze abad ur manati ur beleg hepmaiken (a-wechoù ne oa ket ur beleg zoken, o kaout dindan e veli menec'h a oa bet sakret eskibion en abeg d'o santelezh ha dre ezhomm : rak ret e oa kaout eskibion evit sakriñ beleion ar manati. E-giz-se e voe kont evit Kolomba pe gentoc'h Kolmekel Iona. Hag an abad en devoa beli n'eo ket hepken war e vanati pe war an ismanatioù dindan ar pennvanati, met ivez war an tachennoù bro stag ouzh ar manati. Diouz pennvanati, ismanatioù ha broioù-stag e veze gret ur paruchia : un dachenn relijiel bras emren gant an abad hepken er penn. Er mod-se, buhez a-bezh ar Gelted a oa reoliet war hini ar manatioù.

Un tabut politikel evit schuñ. Fellout a rae d'ar Bibion adurzhiañ an Iliz goude reuz an aloubadegoù barbarek, adreñ d'an eskoptioù kozh o luf a-wechall, reiñ dezho ha d'an eskoptioù nevez bevennoù strizh, ha dreist-holl renkañ anezho diouz ur skeulrenk rik. Da seveniñ o fal ec'h adrojent beli d'ar c'hêrbennoù relijiel a-wechall, re an Impalaeriezh Roman, da lavarout eo Canterbury evit an Inizi Breizh-Veurek, Tours evit Bro-C'hall ar C'hornog. Kement-se a oa sujañ Breizhiz d'o enebourion ha pep hini a oar ervat pennoe e vez kadarnet ar beli politikel dre jeu ar beli speredel. War ar c'hraf-se e oa sur enebiezh ar Gelted da vezañ diblegus.

o o o o

Olivier Loyer

"Mat, a lavarit, met n'hon eus ket c'hoazh klevet anv eus tud anavezet ganimp. Ha Patrick, Kolmekel, Iltud, Daviz, Gweltaz, Samson, berr-ha-berr hor Sent kozh, petere perzh o deus bet en istor an Iliz keltiek ?"

N'hallan ket siwazh komz eus pep tra. Bez' ez eus ur bern kudennoù a blijfe din dirouestlañ dirazoc'h. Sed aze ar re bouezusañ hepken a vefe ret din o studiañ a-benn reiñ deoc'h un alberz ledan a-walc'h eus ar Gristeniezh keltiek :

- 1) Orin ar Gristeniezh keltiek
- 2) Ar venec'h er Gristeniezh keltiek
- 3) Ar sevenadur hag ar Gristeniezh keltiek
- 4) Ar Geltiegezh hag ar Gristeniezh keltiek
- 5) Ar Bed kristen hag ar Gristeniezh keltiek
- 6) Ar politikerezh hag ar Gristeniezh keltiek

Dav din dibab. Studiañ a rin an hini dedemusañ evidomp, da lavarout eo an darempredoù etre ar Gristeniezh keltiek ar Bed keltiek. Koulskoude e lavarin a-raok ur gerig diwar-benn orin ar Gristeniezh keltiek.

ORIN AR GRISTENIEZH KELTIK

Pevare e voe tizhet gant ar Gristeniezh da gentañ Breizh-Veur ha goude Iwerzhon ? Ha gant piv e voe hadet an Aviel ? Hervez Tertullian, a skrive e derou an IIIvet kantved, e oa e Breizh-Veur "tachennoù bro na oant ket bet tizhet gant ar Romaned daoust d'ar C'hrist bezañ tizhet anezho". Ret soñjal neuze e oa skignet an Aviel dre zarn vrasañ Breizh-Veur war-dro dibenn an IIvet kantved. Koulskoude ne vez anv eus eskibion vreizhat nemet ur c'hantved diwezhatoc'h. Gwall rouez, evel a welit, an testennoù diwar-benn stad relijiel an inizi a-raok ar IVvet kantved. Diaes ivez gouzout penaos eo bet skignet ar relijion nevez; gant soudarded, implijidi, ha kenwerzhourion an Impalaeriezh roman, sur a-walc'h. Bez' ez eus tud koulskoude o krediñ ez eo bet ken pouezus-all, ma n'eo ket bet pouezusoc'h, levezon Iliz ar Keter war Iliz kentañ Breizh-Veur. N'on ket a-du tamm ebet gant seurt mennoz, petra bennak ma ranker anzav ez eus aze ur gudenn ha n'eo ket bet dirouestlet penn-da-benn.

Maoc'h a ouzomp diwar-benn ar Vvet kantved. Tri anv a zo ret kaout koun anezho amañ : St Ninian ha dreist-holl St German Auxerre ha St Padraig. St German, kaset gant Roma e 439 hag e 447 da ziskar e Breizh-Veur disivoud Pelagos oc'h ober e reus

Olivier Loyer

eno, en deus bet ul levezon vras war donkad kristen ar vro. Luziet kenañ siwazh eo istor e vision, a oa politikel kenkoula ha relijiel. Luzietoc'h c'hoazh istor mision Padraig e Bro Iwerzhon (432). Piv oa Padraig ? Daoust hag ez eus bet unan pe zaou bPadraig ? Ha darempredoù en deus bet gant St German ? Daoust hag-ef e oa bet kelenet ha beleget e Bro-C'hall ? Ha manac'h e oa pe ne oa ket ? Peseurt Iliz en deus krouet e Bro-Iwerzhon : un Iliz klasel, eskobel war stumm hini Roma pe Vro-C'hall pe un Iliz vanac'hel ? Berr-ha-berr, daoust hag an Iliz keltiek, manac'hel he stumm, zo da vezañ klasket hec'h orin e mision Padraig pe a-rack pe gentoc'h kalz diwezhatoc'h, evel a soñj din ? Fegoulz neuze e krog an Iliz er broioù keltiek da gemer he stumm keltiek, penaos ha perak ? Goulennoù siwazh n'hallan ket respont oute amañ rak tremen poent eo din stagañ gant ar gudenn am eus lavaret deoc'h e felle din pleustriañ warnezhni hiziv. Tra-walc'h eo bet din reiñ deoc'h ur framm istorel eus amerioù kentañ an Iliz keltiek.

AN ILIZ KELTIK HAG AR GELTIEGEZH

Penaos o deus en em unanet ar Gristenieg hag ar Geltieg-egh en hon Iliz kozh ?

Studiomp ar gevanaoz-se war dachenn ar gevredigezh da gentañ-holl. Gwelomp penaos en deus en em gwriennet ar manati e kevredigezh ar Gelted.

Ret eo amañ lavarout un nebeut gerioù diwar-benn stad ar gevredigezh keltiek. Ur gevredigezh diazezet war ar meuriad e oa hi : ne oa nemet ur c'hevredad a veurioù emren, hep framm politikel start ouzh o c'henstagañ. Koulskoude ar meuriadoù o devoa an hevelep hengoun relijiel, sevenadurel ha kevredigezhel. Bras e oa neuze an unvaniezh en desped d'an diouer a framm politikel, evel ma tiskouez splann gouelioù broadel Iwerzhon. Unvaniezh speredel ma fell deoc'h, met bruzunadur politikel. Ar meuriad a oa graet gant tiegezhioù. Tad pe rener an tiegezh a oa en e zalc'h ur beli diharz war an tiegezh, ar gwir gantañ da lazhañ hini pe hini eus e gerent. Ha koulskoude en desped d'ar beli-se e oa an tiegezh ur gumuniezh, ur strollder. Ne oa ket e vadoù tra an tad hepken, met tra an holl : kenberc'h-enniezh hon eus amañ.

Heñvelder seurt stumm kevredigezhel ouzh framm manac'hel pe vanatiel an Iliz zo sklaer. Tiegezh ha manati zo koulz an

eil hag egile kevredigezhioù pe strollderioù kumuniezhel daoust ma'z eo an eil koulz hag egile dindan aotrouniezh un tad pe un abad ken ledan e veli ma c'hell kas hini pe hini eus an izili d'ar marv : rak evel ma lavar Kolomban en e reolen : "Dleout a ra ar manac'h sentif ouzh an abad betek ar marv." A zo muic'h, ar strollad manatioù dindan an hevelep penn-manati a zo emren evel ar meuriad. Dres evel n'eus ket a stad politikel, n'eus ket a Iliz kreizennet. Darempredoù ur strollad manatioù gant ur strollad all e zo heñvel ouzh darempredoù ur meuriad gant un all. N'int nemet darempredoù prevez hep ma veñe skeul-renk ebet o tiforc'hañ un abad diouzh un all. En diwezh e c'heller keñveriañ al liammoù o stagañ ur strollad manatioù ouzh ar Sant diazezer gant ar re a genstag ar meuriad ouzh ar gourdad. Emañ pep manati eus ar strollad o tiskenn diouzh ar Sant evel n'emañ pep tiegezh eus ar meuriad o tont diouzh ar gourdad.

Deomp pelloc'h. An Iliz ne oa ket hepken heñvel he framm ouzh hini ar gevredigezh. Bez' e oa liammoù start etre ar meuriad-mañ-meuriad hag ar manati-mañ-manati. Ar meuriad en devoa da batrom, da c'hourdad speredel ma fell deoc'h, sant diazezer ur manati hag a-c'hin dibabet e oa abaded ar manati e-touez renerion ar meuriad. Abaded Iona, da skouer, a voe dibabet e-touez renerion meuriad Kolmkel. Dre seurt liammoù e oa ar meuriad tra ar sant krouer hag a-c'hin e oa ar manati, pe gentoc'h ar strollad manatioù krouet gant ar sant, tra ar meuriad. Setu perak e c'hellas Kolmkel kas holl dud e veuriad d'ober brezel d'ur meuriad all en abeg d'ul levr santel e oa bet ef tamallet bezañ laeret digant un abad all.

FILID HA MENEC'H

Kontet e vez deomp gant istorourion Padraig penaos e stourmas a-enep an drouizez. Er c'hontrol mignon d'ar filid e oa deuet da vezañ abaoe an derou. Penn-rener ar filid, an Ard Ollamh, en deus roet sikour dezhañ hag a-benn ar fin gouezet eo bet d'ar C'hrist, pezh a lakaas kalz a filid all da gemmañ kredenn. Hervez an hengoun, kalz a sent kozh eus an Iliz keltiek a vije bet izili eus urzh ar filid. Fiacc. Kiaran, Komgall, dreist-holl Kolmkel. E koulz ur vodadeg veur broadel e norz Bro-Saoz e voe kavet abeg e doareoù ar filid ha paneve Kolmkel e vije bet distrujet an urzh.

Skolioù ar venec'h a oa heñvel e meur a geñver ouzh re ar filid. Bugale an uhelidi a oa fiziet enno dres evel ma oant bet a-rack ha ma oant c'hoazh fiziet er filid. Gant ar venec'h e

teske ar vugale ar Skritur Sakr dre 'n eñvor, evel ma teskent mojennoù meur an harozed gant ar filid. A zo muioù'h, arabat kredif ne oa danvez kelennadurezh ar venec'h nemet relijiel. Ha pa gelennent traoù disakr d'o skolidi ne oa diforc'h ebet, koulz lavaret, etre o skol hag hini ar filid.

Hefivelder an div skol a vo sklaeroc'h c'hoazh pa vo bet lavaret ur gerig diwar-bonn kustum ar fosterage, a zo ret dere'nel kont anezhañ evit kompren ervat darempredoù ar vistri hag ar skolidi er broioù keltiek. Un doare advabañ e oa ar fosterage. Fiziet e oa ar bugel a-vihanik en ur mager a veze roet dezhañ gwirioù un tad gwirion. Ar c'hustum kozh-se ne oa ket keltiek hepken : emañ kont evel-se hiziv c'hoazh gant kalz a gevredigezhioù kentidik. Met deuet e oa da vezañ darn eus hentennoù kelenn ar Gelted. Rak, pa veze kemeret un drouiz pe ur file da dad mager, a oa neuze kelennet ha tad war un dro. N'eo ket diaes gwelout penaos e klote kustum ar fosterage gant mennoz kristen an dadelezh speredel. Setu perak, ar Gristeniek ne dorras ket ar c'hustum, pell alese; e implijout a reas er c'hontrol. Ar manac'h a gemeras lec'h an drouiz pe ar file, o tont da vezañ tad ar bugel fiziet emañ, tad e-keñver spered, met ivez tad e-keñver lezenn.

Keñveriañ a c'haller c'hoazh ar manac'h ouzh ar file war ur poent all. Evel ma oa bet fiziet a-raok hengoun ar vro er file, e oa fiziet bremañ er manac'h. Ar venec'h o deus lakaet dre skrid ar mojennoù, an danevelloù, al lezennoù kozh a oa bet fiziet en eñvor ar filid betek neuze. Dic'hortoz eo, met d'ar Gristeniek ez omp-ni dleourion ma n'eo ket bet peur-gollet hon hengoun keltiek. Distreset eo bet ganti, sur, lamet traoù 'zo a oa re bagan, badezet eo bet. N'eus forzh, evit ar wech kentañ eo bet lakaet dre skrid hag e-giz-se dalc'het evit an amzerioù da zont. Met ar venec'h n'int ket bet hepken fizidi an hengoun; kendalc'herion an hengoun ez int bet ivez. Mojennoù nevez o deus ijinet, o kemer ar sent ha n'eo ket an harozed evit o danvez. Mojennoù meur kristen, hengounel koulskoude, leun a elfennoù pagan.

KRISTENIEZH HA PAGANIEZH

Deomp pelloc'h. Diskouezet em eus penaos emañ framm ar gevredigezh keltiek o treuzparañ en urzhiadur an Iliz keltiek. Fellout a rafe din bremañ diskouez penaos emañ gweladur relijiel ar Gelted kozh o treuzparañ er Gristeniek.

Ar sent o deus kemeret lec'h an doueoù. N'eo ket hepken er broioù keltiek e c'hoarvezas kement-se. Met marteze ez eo gwir-oc'h pe splannoc'h evit ar Gelted eget evit poblaoù all. Kemeromp skouer Santez Brec'hed. Patronez ha mamm Iwerzhon eo hi hag hervez an hengoun c'hoar Padraig. Krouet he deus ur manati doubl (da lavarout eo manati ha kouent asamblez) e Kildare, ma voe un tan sakr o teviñ betek maread ar Grennamzer hag a oa evshaet gant nav leanez uhelwad. Keñveriet eo bet ouzh ar Werc'hez, peurhefvelaet zoken outi, anvet Mamm Jezuz, Mamm Doue. Ober a ra war-dro ar merc'hed o willoudiñ, erfin. Tra-walc'h eo se da ziskouez ez eo St Brec'hed hêrez an Douez Veur, Brec'hed ivez hec'h anv, Douez VEUR an holl vroioù keltiek, un douez-VAMM a oa he santual dres e Kildare, e-lec'h m'edo nav gwerc'hez o veilhañ un tan sakr.

M'o deus ar sent kemeret lec'h an doueed alies, aliesoc'h c'hoazh o deus kemeret lec'h an harozed. S. Czarnowski en deus diskouezet kement-se en ul levr brudet, Le culte du héros et les conditions sociales de ce culte (1919). Diazezet en deus e studiadennoù war skouer Padraig ha n'eo ket war hini Uchulain. Rak e soñje dezhañ e c'halled kavout e Padraig holl azonoù an haroz. Aet eo re bell d'am menno petra bennak ma'z eus kalz a dra da virout eus e studiadennoù. Met lezel a rin Padraig a-gostez evit kemer ur skouer all : hini an Immram, Immram St. Brendan. An Immram : setu un anv anavezet mat gant an holl vrezhonegerion abaoe barzhoneg veur Maodez Glanndour. Ur vojenn e oa a gonte troioù kaer un haroz aet kuit war ar morioù da glask Tir-na-nog, Douar ar Re Yaouank, enezenn ar re wenn, hag a oa evit ar Gelted unan eus furmoù ar Bed all. E-doug seurt beaj e keje an haroz ouzh marzhoù diniver. Beaj Maelduin eo an hini brudetañ eus ar mojennoù pagan se. Beaj St. Brendan a zo un Immram kristen, ha Brendan a diskennad eus Maelduin. Kuitaat a ra Brendan e vanati gant ur bagad menec'h da glask ar Baradoz, a oa da vezañ kavet en tu-hont d'ar mor diouzh a lavarer, hag int-i da vont diouzh un enezenn d'un all ha da gejañ ouzh burzhudoù a bep seurt, ouzh tud boemus pe ouzh erevent iskis. A-benn ar fin, goude tec'hout diouzh an Ifern, un enezenn dan, gronnet gant dour o

virviñ, e kavont an douar prometet, leun a vrvigoù, bleunioù, frouezh ha c'hwezioù mat.

M'am bije amzer e komzfen ouzhoc'h a-zivout an doare he deus bet an Iliz keltiek da adkemer lec'hioù sakr ar Gelted. Ur gudenn anavezet a-walc'h eo hounnezh. Ret din koulskoude pouezañ war ur poent : war natur sakr an inizi, koulz en amzer ar Baganiezh hag en hini ar Cristeniezh. E marevezh ar Gelted ez eo en inizi e veze diskuliet d'an diskibled kevrinoù o relijion : deskoniet e vezent eno. Hervez Caesar e oa Breizh-Veur a-bezh un enezenn sakr evit Galia. Mont a rae di drouizet ar C'hevandir da beurglokaat o gouiziegezh. Pep enezenn he devoa un doare galloud sakr. N'eus ket da vezañ souezhet neuze, mar deuas an inizi da vezañ lec'hioù karet ar venec'h, ma voe diazezet enno manatioù brudetañ ar Cristeniezh keltiek. Eno e oa bremañ diskuliet d'ar re yaouank kevrinoù ar relijion nevez.

BOAZ PAGAN HA SPERDELEZH KRISTEN

Decmp pelloc'h c'hoazh. Dedennus eo studiañ levezon ar baganiezh war furmoù uhelañ ar speredelezh kristen. Kemer a rin div skouer : ar yun hag ar pezh a vez anvet ar peregrinatio.

Ar yun : kastiz ar c'horf pe embleustrerezh relijiel dre ar yun a oa kaset pell gant menec'h an Iliz keltiek. Ne raent aze nemet heuliañ skouer menec'h an dezerzh. Ur boaz kristen ma'z eus unan ! Ha koulskoude yun ar venec'h keltiek en deus un orin all ivez.

Ar yun a oa ur prosezadur a rediezh, un doare-rediañ hervez al lezenn e-touez ar Gelted kozh. Ne c'halle ket ur c'hredour kaout dalc'h war vadoù un dleour a renk uheloc'h egetañ. Azezañ a rae ar c'hredour dirak dor an dleour ha yunañ, ha rediet e veze an dleour gant ar yun-se da baenñ e zle. An doare ober-se a dreuzvevas dreist ar baganiezh. Kavet e vez e buhez ar sent kalz skouerioù eus ar boaz-se. Ur wech e yunas St Ruedhan ha St Brendan en doare-se a-enep d'ar roue Diarmait evit kaout o dle. Hag ar roue da yunañ eñ ivez pa velas se, evit terriñ galloud yun ar venec'h. Yun a-enep yun ne oa nemet an doare-se da zizarbennañ goulnn ar venec'h ! Ar sent a reas neuze da baouez gant o yun hag ar roue a baouezas ivez; gwazh a se evitañ : yun ar venec'h a gemeras galloud a-nevez ha trec'het e voe ar roue. Met daoust ha n'eo ket Doue Roue meur

an Douar hag an Neñv ? Yunañ a ra eta ar venec'h keltiek a-enep da Zoue da gaout o mad digantañ. Ha rediet e vez Doue kenkoulz hag un dleour. E-leizh a skouerioù a c'hallfen reiñ eus kement-se.

Ar peregrinatio, ar pirc'hirinerezh. N'he deus netra da welout gant hor pirc'hirinerezh a-vremañ. Pirc'hirin ar Cristeniezh keltiek n'a ket davet ul lec'h santel bennak. Un den o'n em harluañ a-youl kaer ez eo, un den a zilez e vro evit en em gastizañ hag evit en em reiñ da youl an Aotrou Doue. Kemer a ra skouer diouz Abraham o kuitaat e vro evit Bro Egipt. Buhezskrivour St. Kolomban a skriv : "Ar c'hoant pirc'hirinañ a grogas ennañ pa soñjas en urzh Doue da Abraham : "Iez amañ da vro, da diegezh ha ti da dad ha kae d'ar vro a ziskouezin dit." Hag alies ez se kuit ar venec'h evel-se gant bigi hep gouel na roeñv, kaset-digaset gant an avelioù d'al lec'h a blije d'an Aotrou Doue.

N'eo ket diass keñveriañ seurt peregrinatio ouzh an Immram, ar verdeadurezh kevrinel am eus komzet diwar he fenn. Muic'h eget ur veaj d'ar bed all eo, e gwirionez, seurt verdeadurezh : un treizhlied (initiatio) hag un dic'haouadur (expiatio) ez eo. Un treizhlied. Ul lec'h sakr a vez eus pep enezenn evel am eus lavaret. A zo muic'h, ez eo pep ergerzhadenn a-dreuz ar mor arouez un torr, ur reverzhi ha derou un azginivelezh e buhez un den. Setu perak e veze ar boaz, gant ar Gelted, treuziñ ar morioù da beurglokaat o deskadurezh. Soñjit ivez e Tristan o kuitaat Kernev-Veur evit mont da Iwerzhon, e derou e vuhez gour, evit lazhañ ar Morc'holt eno. Un dic'haouadur. An harlu en tu all d'ar mor a oa evit ar Gelted kozh ur c'hastiz lakaet war dorfedourion 'zo : lestreet e vezent war ur vag hep gouel na roeñv ha kaset da vale. Kristenidigezh ar boaz hag ar mennoz zo siklaer. Un treizhlied eo ar verdeadurezh gristen, un torr, ur reverzhi ez eo, evel an Immram pagan : marv an den kozh, ganidigezh an den nevez, dibenn ar vuhez hervez ar bed, derou ar vuhez disi. Un dic'haouadur ez eo ivez : un dic'haouadur evit un torfed gwirion a-wechoù, evel ma tiskouez ar rolloù pinijennoù implijet er manatioù, pe un dic'haouadur emyulek, evel ma welomp gant ar venec'h diniver-se o vont kuit war vor en ur vag n'he devoa ivez na gouel na roeñv, o sellout outo o-unan evel torfedourion a-keñver Doue. Berr-ha-berr a-dreñv ar boaz pagan koulz hag ar boaz kristen e vez an hevelep mennoz : keat ar bed all a zo da gentañ an harlu, ur marv d'ar bed-mañ, ha goude un treizh risklus etre marv hag azginivelezh.

o o o o o
o o o
o

T A O L E N N

KINNIG	3
ROLL AR PREZEGENNOU DISPLEGET E KAMP ROSTRENEK	5
A-ZIVOUT AL LENNEGEZH gant Ewan GVEGEN	7
GWANADUR AR C'HENSONENNOU E BREZHONEG gant Goulven PENNADO	19
SIMON BOLIVAR, AL "LIBERTADOR" gant ABENNEZ	33
WAR HENTOU AN ARDAMEZOURIEZH gant ABENNEZ	39
AR GRISTENIEZH KELTIEK gant Olivier LOYER	47

ooo

mmm m mmm mmm mmm mmm mmm
 mm m mmm m mmm mmm mmm mmm
 mm m mmm m mmm mmm mmm mmm
 mm m mmm m mmm mmm mmm mmm
 mmm mmm mmm mmm mmm mmm mmm
 mm m m mmm mmm mmm mmm mmm
 mm m m mmm mmm mmm mmm mmm
 mm m m mmm mmm mmm mmm mmm

Komanant 12 niverenn 45 FF.
 Komanant d'ar Geriadur Istorel
 Hepken (4niverenn) 15 FF.
 Komanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn) 30 FF.

Rener : G. ETIENNE
Embanner : L. LEMOINE
Sekretourion : P. CALVEZ, M. POULAIN

Al lizheroù da : PREDER, 30 Place des Lices, 35 - RENNES
 An arc'hant da : M. G. ETIENNE, CCP 16 093 13 , Paris

Kentañ trimiziad 1966

Priz ar c'haier-mañ 5 FF.

Moulet gant SADED
 CPPP Nn 35.709
 Diskleriet hervez lezenn, Kentañ trimiziad 1966.

